


HOR
YEZH

96



miz Eost 1974

HOR YEZH : kelaouenn a yezhoniezh savet gant ARZEL EVEN . Koumanant : 20 lur evit PEDER niverenn , liesskrivet pe voulet , 50 pajenn da nebeu-tañ e pep niverenn . Priz an niverenn-mañ : 8,00 lur . Rener : Per Denez ; Sekretour : Yann Desbordes , 1 place Charlez Peguy ; Poullbriant , 29260 Lesneven . Koumanantoù paeet dre gont-chek : 20,00 lur d'ar CCP 1499-51 Rennes , War anv P. Denis . Koumanantoù paeet dre ar bank : chekennoù bank d'ar rener : Per Denez, Ri , Ploare , 29100 Douarnenez . Niverenn CPPAP : 51765 . Embannadur mareadek anavezet gant ar Post . Lies-tennet ez-prevez gant HOR YEZH . Diskleriet hervez lezenn : trede trimiziad 1974. Merour : Denez Pep gwir miret strizh .

Priz an niverenn-mañ: 8,00 lur. miz Eost 1974. Niv. 96

Evit kelenn brezhoneg

BREZHONEG BUAN HAG AES

gant Per DENEZ

skeudennoù gant Nono

levr + levr reizhadennoù + pladennoù
pe minikasedoù

KOMZIT HA SKRIVIT BREZHONEG

levr poelladennoù da vezañ
implijet war un dro gant
"Brezhoneg Buan hag Aes"
poelladennoù gant Per DENEZ
skeudennoù gant NoNo
(da zont er-maez hepdale :
pladennoù ha minikasedoù)

War ar stern

SKRIDOU BREZHONEK

ul levr pennadoù dibabet
evit ar skolioù

BREZHONEG BEMDEZ

ul levr "drills" o vont
da heul "Brezhoneg Buan hag Aes"

F. KERVELLA

Anvioù-lec'h ar vro vrezhonek
(prezegenn graet e Kamp ar Vrezhonegerien,
1974 e Pont e Kroaz. gant kartennoù)..... 5

Jorj BELZ

" En devout " e Plouharnel 31

Jorj BELZ

Guerzour Mod Kouh 35

Arnodennoù Skol-Veur Breizh-Uhel , un nebeut
testennoù roet e 1974 44

FANÇH AN UHEL

Gwerzioù dibabet

(eilskrivet evit Hor Yezh
gant Y.E. Abalan) 49

S K R I D

Kelaouenn embannet e Kevrenn geltiek
Skol-Veur Breizh-Uhel Roazhon

E-barzh S K R I D e vez kavet labourioù a bep seurt
savet gant studierien Kevrenn Geltiek Skol-Veur
Breizh-Uhel, Roazhon .

Embannet dija niverennoù 1, 2, 3 ha 4 .

Danvez an niverenn 4 .

Heinz KAHLAU : Barzhonegoù (troidigezh Herle DENEZ)
Liza GIZIOU : Klemmoù ar chatibi . Mark KERRAIN :
Distro . Jorj BELZ : Mar a vle goude (Brezél 14) ,
Barhonieh hun amzer-ni , Più en des choejet , Skrap
ar skrap . Yann-Fañch AR GO : Ar vereuri . Bernez
ROUS : Al Liamm hag e goumananterien . Boris VIAN :
Barzhonegoù (troidigezh F. KERSKAVEN) . Yann-Ber
BOUCHER : E Keltia gozh . Mikael BURLLOT : Kenavo .
Alan FICHET : Kejadenn . Alan AN AFFETER : Tud ar
goañv . Eujen KONAN : Ar sevel-istr e-barzh an dour
don e pleg-mor Sant-Brieg . M.N. GWEGEN : Ur bourk .
Gweltaz HAMEL : Buhez hon tadoù en o menajoù levezeg
pe zilevezeg . M.P. RETY : Ma bugaleaj war ar maez .
Fañch KERSKAVEN : Diwar-benn "Faut qu'ça bosse" .

Koumanant evit peder niverenn : 20,00 lur da gas dre chekenn-
bost da P. DENIS , CCP 1499-51 Rennes . Ar chekennoù-bank a
zo da vezañ kaset da b-Per DENEZ , Section de Celtique , Uni-
versité de Haute-Bretagne , 35000 RENNES-Villejean .

Evit kaout an niverennoù unan-hag-unan skrivañ da :
Makoto NOGUTI , Section de Celtique , Université de Haute-
Bretagne , 35000 RENNES-Villejean , ha kas dezhañ ur chekenn
war e anv pe war anv Per DENEZ .

F. KERVELLA

Anvioù-lec'h ar vro vrezhonek

Evit kregiñ

Savet eo ar studiadenn-mañ diwar-benn anv al lec'hioù annezet
a Vreizh. Ha pa lavaran "Breizh" e fell din ober anv eus
ar vro vrezhonek, ha pa lavaran "bro vrezhonek" ne deo ket
ar vro-se hepken ar pezh a veze graet anezhañ Breizh-Izel e
penn kentañ ar c'hantved-mañ, ar rann eta a Vreizh ma chomas
bev ar brezhoneg enni betek hon amzer, ar rann-se hag a vije
bet gwell moarvat kendalc'her da envel GOUELD BREIZH evel
ma kaver skrivet el levrioù kozh. Bez' ez eo ivez ar rann-se
eus Gorre Breizh a oa bet brezhonekaet gant hor c'hentadoù
pa zeujont da vezañ en tu-mañ d'ar mor ; ar rann-se eus ar
vro bet gounezet tamm-ha-tamm gant ar galleg ha deuet da
vezañ ar pezh a anver bremañ ar vro c'hallou.

Ur gerig, mar kirit, diwar-benn ur gudenn gerioù. Lakaet
em eus e penn va skrid "anvioù-lec'h ar vro vrezhonek", ha
kerkent goude setu me o kregiñ va displegadenn gant "anv al
lec'hioù annezet". Pouezañ a ran un tammig war gement-mañ o
vezañ ma 'm eus gwelet skrivet meur a wech anvioù-lec'hioù
Breizh. Ne c'heller ket lavarout e ve fall kement-mañ, ma
vijs skrivet hep tired da vihanañ, da ust ma ne zoug peur-
liesañ pep lec'h nemet un anv. Gwell eo bet din avat ober
gant anvioù-lec'h ; evel ma reer gant anvioù-badez, binvioù-
kegin pe dilhad-sul ha neket gant "anvioù-badezioù", gant
"binvioù-keginoù" pe "dilhad-sulioù" !

Hor c'hentadoù, hen lavaret em eus, a zeue eus an tu all
d'ar mor. Ha du-hont, e Kerne-Veur, he deus padet, betek n'
eus ket gwall belloù, ur yezh tost kar d'hon hini, ar c'her-
neveg. Pelloc'h en Norzh ez eo bev-mat bepred ar c'hembraeg,
un tammig disheñveloc'h eus ar brezhoneg eget ne oa ar yezh
all. Ar re ac'hanomp o deus darempredet kembreiz avat a zo
bet souezhet o welout pegen disheñvel eo an anvioù tiegezh a
zougont diouz ar re a vez douget e Breizh. Pa seller ouzh
anvioù al lec'hioù ma vevont enno, e santer er c'hontrol pe-
gen heñvel eo an anvioù-se ouzh ar re a vez kavet dre amañ.
Ha ken gwir all eo evit Kerne-Veur.

Pa seller ouzh ur gartenn eus hor broioù ar c'huzh-heol, e
taoler evezh pegen stank e vez an anvioù-lec'h war ar c'har-
tennoù-se e-keñver ar pezh e vezont e meur a vro all. An abeg
da se eo e vez, e broioù an tu-mañ an dud o chom a-strew e
kêriadennoù bihan war ar maez.

Pep lec'h annezet a zo evidomp ur gêr. Ha pep kêr a zoug
un anv. Ne deo ket souezh eta e ve ar ger Kêr hag a ve graet
gantañ ar muiañ evit envel al lec'hioù gant an dud o chom
enno. Bezañ er gêr a zo bet a-holl-viskoazh un dra a bouez
evit pep hini ac'hanomp. Mar deo trawalc'h da unan lavarout
mont d'ar gêr evit gouzout da belec'h emañ o vont, evit ar
re all e veñe kement-se un tamm berr ; hag ezhomm o devez da
c'houzout penini eo perzh dibar ar gêr-se.

Kement-se a c'hell bezañ graet e keñver al lec'hiañ er vro :

komzet e vo neuza eus ar Gêr Uhel, ar Gêr Grec'h, ar Gêr Draig, pe c'hoazh eus ar Gêr Nevez -- ur "gêr nevez" hag he devo alies bet amzer da vont da Gêr Gozh meur a wech abaoe m'eo bet roet dezhi hec'h anv.

Ret eo eta reiñ un anv da bep lec'h hag an doare eeunad eo c'hoazh stagañ un anv den ouzh ar ger kêr-se. Daou zoare pennañ a zo evit hen ober :

1) Stagañ war-eeun an anv den-se ouzh ar ger Kêr, hag e reer neuze ar c'hemmadur ret e kensonenn gentañ an anv : Kerbêr, Kergaradeg, Kerzeniel, Kervengi, Kervrec'h...

2) Pe neuze lakaat ar ger-mell etre ar ger Kêr hag anv an den, ha ne c'hoarvez neuze nemet ar c'hemmadur K/C'H en hemañ. An doare-ober-se a gaver miret alies er "skritur ofisiel", hep kemmadur zoken ("Kerancoren", "Kerancalvez") : Kerambars, Kerampennec, Keranfloch... e brezhoneg komzet avat ne chom anat ar ger-mell nemet dre gemmadur K da C'H : Kerc'hoad, Kerbarz, Kerpenneq, Kerfloc'h.

Anat eo koulskoude e kaver estreget anvioù e Ker- er vro vrezhonek. E-touez ar re anavezetañ emañ ar re o kregiñ gant TI (pa ne vez nemet gant an douristed, ha kalz bravoc'h eo c'hoazh evito pa vez skrivet "Ty" !) Koulskoude ne seblant ket an anvioù o kregiñ gant Ti- bezañ eus ar c'hoshañ, hag ar pep brasañ anezho a zo anvet Tinevez : war roll anvioù departamant ar Finistère e kaver evel-se 219 "Ti Nevez" war 1065 "Ti-" (hag ouzhpenn 8 "Tiez"- pe "Tier Nevez"). N'eus avat nemet 25 "Ti Kozh", e-kichen 42 "Ti Gwenn", 25 "Ti Ruz", 24 "Ti Glas", 17 "Ti Maen", 16 "Ti Koad" ha 10 "Ti Douar". Anvioù all, TI enno, a gaver ivez, met savet en un doare eil-pennet : Merdi (50 anezho er Finistère), Leti (14), Kamdi, Klavdi... Hag ar rummad-se eo an hini koshañ hep mar. Hag an doare-se da ober a gaver ivez gant gerioù all : Goariva, da skouer. Ha bez' e kaver 153 Kozhker er Finistère ha 16 Kozh-kastell (da geñveriañ ouzh 160 Kernevez ha 4 Kastellnevez).

* *

Ar braz eus anvioù-lec'h Goueled Breizh a zo diazezet, anat eo, war ar brezhoneg, daoust ma vezer techet, ur pennad 'zo dreist-holl, da dreiñ e galleg anvioù brezhonek 'zo, ar re a zo aes da gompren ! War an tu enep e kaver c'hoazh kalz anvioù brezhonek er rann c'hallou. Eno ez eo an anvioù koshañ, hag a zo ivez ar re bennañ, eo a zo bet miret o neuze brezhonek, tra m'eo bet gallekaet ar pep brasañ eus an anvioù aes da gompren, ha roet anvioù gallek, anat eo, d'an diazezoù nevez.

Anvioù brezhonek Gorre Breizh a zo evidomp evel fosilenned o verkañ betek pelec'h eo aet ar yezh pa oa Breizh oc'h ober he c'hresk. Netra nemet gant ur gartenn ez eus tu en doare-se da ziskouez betek pelec'h eo aet hor c'hentadoù d'en em ziazezañ. Ar c'heleenner Jozeb Loth a voe an hini kentañ hag a roas da c'houzout evel-se e oa bet skignet hor yezh, pa oa en he barr, en navet kantved, betek ul linenn a gas eus kichen Menez Mikael ar Mor betek Doñj, e genoù al Liger.

En tu-hont da se en deus ivez ar brezhoneg, el lec'hioù ma veze komzet etre an eizhvet hag an deket kantved, "fosilekaet" ivez stumm ar "fundi" latin en -AC, bet miret evel-se el lec'hioù ma veze brezhoneget d'an ampoent, tra ma troent en -gê pe

ay er rann ma veze kendalc'het da gomz romaneg, ha ma kaver "Sévignac" en tu-mañ eus al linenn ez eo "Sévigné" eo a zo e-kichen Roazhon, hag ouzh ar Mellaq a zo e Kerne, e klot ur "Mellé" e bro-Roazhon.

Aes eo da bep hini eta kemer ur gartenn ha klask adsevel warni ar vevenn-se. Setu an eus graet va-unan. Hag en ur gas da benn ar pezhig labour-se e reer kavadennoù un tamm eston. Anat e teu diouztu e voe kêrioù Roazhon ha Naoned kreizdennoù -harp ar romaneg, ha setu perak e ra ar vevenn un hanter kelc'h en-dro da gêr Roazhon. Met pelloc'h er bu o deus kavet ar Vrezhoned muoc'h a frankiz evit en em silañ war-du ar Reter ; ur vro rouesoc'h enni an dud a oa moarvat etre an div geoded, ar rann-se a zo dezhi un anv, ar he, hag ar vro-se a voe an hent heuliet ganto evit klask troc'hañ betek al Liger e tro Añseniz. Anv parrez "Treffieux" a zo sur-mat un anv brezhonek, met lec'hioù o tougen un anv brezhonek a gaver betek e parrez "Issé" hag en hini "Les Touches". Diouzh tu an Norzh e klot tost da vat ar vevenn gant an disparti etre eskopti Roazhon diouzh un tu, re Dol ha S. Maloù diouzh an tu all. An anv "Fines" (Fines) a zoug testeni e oa eno penn pellañ keoded Roazhon. Tra ma kaver anvioù romanek o neuze, evel "Dingé" pe "Romillé" diouzh tu S. Maloù, e kaver ivez en tu all d'ar vevenn un anv brezhonek-rik evel "Vignoc", an anv-se (Gwinieg) o vezañ douget ivez gant parrezig Lanvigneg e-tal Pempoull, parrezig bet dilezet e 1601.

Diouzh an tu-se ez eo sonezhoc'h c'hoazh an anvioù brezhonek hag a gaver pell eus ar vevenn, ha betek er-maez a Vreizh : Landean en tu-mañ eus an harz, "Fontmain" ha "Landivy" en tu all, hag un aer brezhonek a zo ivez war eil rann an anv St. Hilaire du Harcouet ! Un eskopti Roazhon emañ Landavran pell eus pep anv brezhonek all, daoust ma 'z eus ivez ur "St. Armel" e tu gevred ar gêr-benn.

Pa zegouezher er broioù-se e vez a-wechoù diaes gouzout ha brezhonek eo anv pe anv, pe daoust hag-eñ e vije un anv galianek en devije treuzvevet amzervezh al latinaat. Techet e veien da grediñ e ve kentoc'h galianek an anv Glanet a gaver el lec'h ma treuz hent-bras Roazhon-Naoned ar stêr Isar, tra ma c'hellfe ar Glanet a gaver war ar Kilun, etre Gwichen ha Bourgomz bezañ brezhonek (= Glanred).

Penaos ren ar studi ?

Iv bennak a sav emañ c'hoant da studiañ anvioù parrez-mañ-parrez, pe zoken re ur c'hanton, a c'hell c'hoazh, aezik a-walc'h, mont dre ar vro evit goulenñ ouzh an dud penaos e vez anvet ganto lec'h-mañ-lec'h. An hini en devez c'hoant da deuler ur sell war ar vro a-bezh a rank en em gemer en un doare all hag en em harpañ war ar c'hartennoù pe an danvezioù all bet embannet.

Evit pezh a sell ar c'hartennoù, an diazeze a oa, betek n'eus ket gwall bell, ar gartenn "Etat-major", bet embannet er skeul 1 evit 80 000, hag a oa bet kresket goude er skeul 1 : 50 000 aesoc'h da embreger. Kornioù 'zo c'hoazh en hor bro, dreist-holl e Leon hag e bro-Roazhon, ma ne gaver atav nemeti. Er bloavezhioù diwezhañ-mañ koulskoude en deus an IGN lakaet e gwerzh ar pep brasañ eus ar gartenn nevez gant ar skeuliad 1 evit 25 000, kalz spisoc'h an dresadenn warni eget ne oa war ar gartenn gozh. Evel avat ma 'z eo bet savet ar gartenn nevez-se buan-ha-buan, diwar skeudenoù kemeret

diwar-nij, ne deo ket an anvioù merket war bep follenn ken stank ha ma c'helljent bezañ bet, e doare ma chom dianv ur bern lec'hioù annezet hag a zoug koulskoude un anv anavezet. E meur a geñver koulskoude ez eus bet gwellaenn e-keñver ar gartenn gozh ; evel skouer e c'heller kemer an anv a veze skrivet Fenhareng war gartenn an E.M. hag a zo deuet da vezañ war hounañ Fennaran, ar pezh a zo tostoc'hik ouzh "Penn ar rann" hag a zo moarvat talvoudegezh ar ger.

"Cadastre" ar parrezioù a c'hell bezañ ivez talvoudus, met dastum an holl follennoù a c'houlenn poan hag arc'hant bras, zoken ma ne gemerer nemet ar follennoù "dre vras" 1 : 10 000 pe 1 : 20 000, peogwir ez eus da nebeutañ unan evit pep hini eus ar c'humunioù.

En diavaez eus ar c'hartennoù e kaver ivez ur pezh-labour talvoudus bet kaset da benn gant burev INSEE Roazhon : roll al lec'hioù annezet hervez follennoù niveradeg an dud e 1946 a zo bet embannet evit ar pevar departamant a zo e diabarzh ar "rann-vro". Talvoudusoc'h e vije bet c'hoazh moarvat evit ar studi ma vije tu da gavout rolloù klok bet savet hanterkant pe gant vloaz 'zo, rak meur a lec'h annezet a zo aet da goll abaoe, ha pa ne venegfen nemet an hini on bet ganet ennañ. Ha bep bloaz bremañ ez a meur a hini da goll, dre ma 'z a ar maezioù war ziboblañ !

* *

Mar deo brezhonek anvioù hor bro ez int bet avat skrivet hervez doare ar galleg d'hen ober. Ac'hano e teu diaesterioù evit lenn meur a anv. Menegiñ a rin hepken ar gwashañ : ar c'hemmesk etre G ha GW dindan an arouez GU ! Pa lenner -guen, -guic, n'eus tu ebet da c'houzout pe gant -gwenn, -gwik hon eus da ober pe neuze ha ne vije ket -gen(n), -gik. War roll departamant ar Finistère e kaver ur "Guerveur" en ugent parrez hag ur "Guervian" e peder. Tu ebet da c'houzout hag-eñ e tleer lenn ar Gêr Veur, ar Gêr Vihan -- a gaver ivez skrivet Kerveur (11) pe Kerveur (20) -- pe neuze ar Mer Veur, ar Mer Vihan -- a gaver skrivet ivez, en abeg d'ar c'hemmadur, Verveur ha Vervian (3 ha 4 gwech). Ket e vije eta mont war al lec'h a-barzh diluziañ ar sudenn ; a-wechoù koulskoude ez eus tu d'en em dennañ e giz all : e peder eus ar parrezioù (Brelez, ar C'hastellnevez, Landelo ha Flouganou) ez eus ivez ur "Guerveur-Vian". Aze eta ez eus lec'h da grediñ ez eo kentoc'h ar Mer Veur eget ar Gêr Veur. Evel-se ivez e vez kavet Verlédan en Erge Vihan tra ma vez skrivet Guerlédan en Hañveg hag en Irvilhag.

Aner e ve dimp bremañ mont re bell war an tu-se. Lavaromp koulskoude e c'hell ivez an anvioù bezañ bet distummet a-hed ar c'hantvedoù, ha dre-se e ve mat anaout penaos e veze meneget an anvioù-se bremañ 'z eus 500 pe 800 vloaz (ar riskl a zo avat da gemer anv ul lec'h evit hini ul lec'h all !) ha da vezañ suroc'h neuze eus talvoudegezh an anv. Setu ur skouer bennak : ar ger digeriñ TRC-, ken stank gant e dalvoudegezh wirion, a c'hell koulskoude bezañ a-wechoù evit "Traezh", pe "Treizh", pe "Traoù" (hemañ diwezhañ o vezañ peurliesañ en anvioù-lec'h dindan ar stumm TRC-). Met ar c'hontrol a c'hell bezañ gwir, ar barrez a vez graet Trogeri anezhi bremañ a oa "Tregeri" gwechall, S. Yann Trolimon, gwechall un dre eus Beuzeg Kab Kaval, a vez kavet er skridoù kozh dindan an anv Tre Rumon. Da ziwall a vez dreist-holl pa vez div wech unan eus al lizherennoù L, N pe R en un anv, rak an teir c'henso-nenn-se a dro aes-tre an eil en eben, hep kontañ an treuz-lec'hiañ a c'hoarvez etrezo : an anv distaget "Iriëll" a zo

evit Flou(c'h)iehl, "Plaerane" a zo evit Flouvalaneg ! Ha Flou- a c'hell bezañ kammgereret evit Poull-, pe ar c'hontrol. "Floumanac'h" a zo evit Poull Manac'h, ha dindan Poullaouen ha Poullan e tiviner Flou Laouen ha Flou Lann !

* *

Anvioù al lec'hioù a rofe tu da studiañ ivez an anvioù a oa douget gant hor c'hentadoù, o vezañ ma kaver er pep brasañ eus an anvioù-lec'h ivez un anv den. Kement-se a zo gwir evit an anvioù o kregiñ gant Ker, Ti, Gwazh, Pont, Roudour, Lilin, Kastell, Koad, ha kalz re all. Anaf eo ez eus koulskoude meur a anv-lec'h ha n'eus ket ennañ anv un den, da skouer : ar Gozhker, an Henbont, al Liorzhoù, ar Roual, ar Gollod, ar Veuzid pe an Traezh Meur...

Met ne deo ket aze pal ar studiadennig-mañ. En em gemer a rin, evel m'o deus graet em raok tud evel Jozef Loth pe René Largillière (evit meneñañ ar re vrudetañ hepken eus ar re o deus graet war o zro) ha kregiñ gant an anvioù a ro ar muiañ a sklerijenn war istor hor pobl. Lakaat a rin eta ac'hanoc'h da brederiañ da gentañ war ar gerioù hag o deus talvezet da reiñ o anvioù da barrezioù kentañ hor bro, hag em bo tro da venegiñ ar re a zo bet anv anezho gant va diagentidi : FLOU-, TRC-, LANN-, LOK-... Hag evel ma n'eo ket va fal sevel istor an diazezoù relijiel e Breizh, ne bouezin ket war an anvioù hag a grog gant SANT-, rak ne gav ket din e vefe gwall anaf an dalvoudegezh o deus evit emziazenn hor pobl.

An anvioù parrez pouezusañ

Dindan an anv "parrez" e ranker lakaat n'eo ket hepken ar parrezioù a zo anezho bremañ, met ivez ar parrezioù hag an trevioù a c'hell bezañ bet dilezet e-kerz an istor. Degas a ran da soñj e benn ar parrezioù bremañ da emglev 1801 etre ar gouarnamant gall hag ar "ab. Neuze e voe diskaret an eskoptioù kozh, ha savet unan nevez evit pep "departamant". Ken neuze e veze lakaet kemm etre ar parrezioù, renet gant ur person, hag an trevioù, rannoù eus ar parrezioù-se a oa enno koulskoude un iliz. Ar pep brasañ eus ar parrezioù kozh a chomas parrezioù hag un nebeud mat a drevioù a voe lakaet ivez da barrez e 1801, pep hini eus ar parrezioù nevez o klotañ gant "kumun" ar Stad (nemet er c'hêrioù bras hag a oa meur a barrez relijiel e pep hini). Daoust ma oa bet savet meur a barrez pe a dre nevez e-pad ar c'hantvedoù, ez eo bet urzhiadur 1801 brasañ kemm bet c'hoarvezet en doare da rannañ ar vro abaoe donedigezh ar Vrezhonek.

Dre vras n'eo ket savet anvioù ar parrezioù en un doare disheñvel diouzh al lec'hioù annezet all. Kregiñ a reont gant ur ger digeriñ ha klokaet e vezont gant un eil ger a zo peurliesañ un anv den. Koulskoude ez eus gerioù digeriñ hag a gaver kalz stankoc'h eget re all en anvioù parrez ha daou a zo zoken (Flou- ha Gwik-) hag a c'heller lavarout ne vez graet ganto nemet evit an anvioù parrez. Setu da heul an niver am eus kavet evit ar gerioù-se :

FLOU-	: 171 (+ 15 GWIK-)	LCK-	: 50
LANN-	: 97	ER-	: 29
TRC-	: 89	BCD-	: 17

En tu-hont da se e kaver gerioù a bep seurt evel Koad,

Les, Bre, Penn, Pont, Ros, Kastell o tigeriañ an anv parrez, hep kontañ hiniennoù eus ar parrezioù hag o deus anvioù a bep orin. Ar re niverusañ eus ar re-se o vezañ ar re n'o deus evel anv nemet anv un den (a greder bezañ bet ur sant).

Plouezioù, lannoù ha trevioù

An anvioù parrez o kregiñ gant FLOU- eo eta ar re niverusañ, hag a bell, o tont a-wechoù gant un neuz un tamm disheñvel : Flo-, Fleu-, Ple-, Plu-, Pl-,... Da heul an anvioù-se e ranker lakaat ar re o kregiñ gant Gwi(K)-, 13 anezho en eskopti Leon hepken, an daou anv all o vezañ unan e Treger, egile en eskopti kozh S. Maloù. E gwirionez ez eus bet graet bremañ un dibab etre an anvioù o kregiñ gant Flou- hag ar re o kregiñ gant Gwik-, hogen er skridoù kozh e Kaver an daou keñver-ha-keñver, an hini kentañ o tennañ d'ar barrez en he fezh, an eil d'ar greizenn hepken (ar pezh a anvomp dre vras ar vourc'h). Bremañ e Kaver e Leon a vez anvet Gwi- e brezhoneg ha Flou- e galleg, Gvitevede ha "Plouzévédé", da skouer.

Un dra heverk-tre eo an anvioù-lec'h o kregiñ gant FLOU-. Da gentañ o deus doare da vezañ holl parrezioù, zoken mar deus hiniennoù eus ar parrezioù-se, evel Flonivel, hag o deus kollet o renk : bez e c'heller lavarout eta ez eo kendalvoud "plou" gant "parrez". D'an eil ez eo un dra vreizhat-rik, rak mar deus kement a anvioù e Tre- hag e Lann- e Kembre hag e Kerne-Veur ha ma 'z eus e Breizh, ez eo dianav du-hont ar re e Flou- (nemet unan e Kerne-Veur marteze). A dalvoudegezh eo eta ar ger-se e-keñver istor diazez ar Vrezhoneg er vro-mañ.

Koulz ha gwik (vicus) e teu an anv ploue diwar al latin (plebs), hag er yezh-se ez eo kendalvoud gant "pobl", ar pezh a laka war-wel ar gendalvoudegezh a zo bet etre pobl ha parrez en amzerioù kentañ hor bro. Ar ger "gwik", eñ, a dalvez tost da vat kement ha "kêr" pe "kreizenn". Er parrezioù a zo dezho bremañ daou anv, e talvez eta an anv e Flou- evit ar barrez dre vras, hag an hini e Gwi- evit ar greizenn, ar pezh a anvomp bremañ "ar vourc'h". E lec'hioù zo a vro-Leon ma vez graet atav bremañ ploueziz eus an dud diwar ar maez.

Ar parrezioù a grog o anv gant Gwi- a zo bodet holl e Leon nemet unan e Goueled Treger (Gwimaeg) hag unan all pell du-hont war ribl ar Wilun : Gwipri (nemet ha "Guipel" bro-roazhon a vije unan ivez). Ma sellomp avat ouzh ar gartenn 1 e welomp traoù souezhus a-walc'h evit ar pezh a sell lec'hiadur ar parrezioù e Flou- : Rannoù 'zo er vro m'eo stank-tre ar parrezioù a grog o anv gant ar gerig-se :

- Bro-Leon en he fezh.
- Treger Izel, etre Montroulez hag al Leger, a zo peurleniet gant seurt parrezioù (hag unan e Gwi- en o zouez).
- Stank-tre eo ivez ar plouezioù e tu reter an eskopti hag, en tu-hont d'al Leñv, e Gouelou eskopti S. Brieg : hag heverk eo, en eskopti-se ar rigennad parrezioù a gendalc'h betek beg an eskopti er Su (Flouvael ha Flouveog). Un nebeud re all a zo bodet en arvor ar biz.
- En eskoptioù kozh S. Maloù ha Dol e weler ar muiañ parrezioù e Flou- en-dro da zDinam, tra ma 'z int pouez en arvor koulz ha muioc'h e diabarzh ar vro ; pa en em gaver er Forc'hoed zoken ne gaver nemet div anezho : Flelann-Veur ha Flouarzhel, ar pezh a ziskouez ar rannadur etre daou eus an eskopti gant ar c'hoadeier bras.
- Souezhusoc'h c'hoazh eo ar stad en eskopti Kerne. Mar deo tost da vat goloet gant ar parrezioù e Flou- ar vro

a zo en avel izel d'ul linenn o kas eus Menez C'hom da Gemper, hag ac'hano da Venoded, mar dint stankik a-walc'h ivez etre Menez Are ha stêr-Aon, ne gaver nemet unan e penn ar gwalarn (Ilougastell), hag en holl lodenn eus an eskopti bevennet gant ul linenn o vont eus Benoded da Gastellin, ac'hano a-hed ar stêr betek stokañ ouzh Flougêr ha treiñ neuze etrezek ar su da dapout stêr-Elle hag ar mor, ne gaver kennebeut eno nemet Fleuven.

- En eskopti Gwened e c'heller gwelout (kartenn I) ez eo ivez rouez a-walc'h an anvioù-parrez e Flou- nemet koulskoude en arvor, ken e vije lavaret ez eo bet savet a-ratozh ar re-mañ e tu gwalarn kêr Vened da enebiañ ouzh levezon ar geoded roman-se. Ha pelloc'h e tu ar sav-heol e teont da vezañ c'hoazh rouesoc'h, ha dianav zoken en eskopti Naoned, ma tenner er-maez Flesel hag a c'hellfe marteze bezañ unan. Bez' e c'heller c'hoazh menegiñ unan en eskopti Roazhon, "Fléchatel" evel ma vez skrivet bremañ an anv anezhi, ur b-"Flougastell" hag a zo bet ul lec'h a-bouez evit kreñvaat dalc'h hor yezh en tu-hont d ar Wilun.

Ne gaver ket un direizher heñvel evit ar parrezioù a zo dezho un anv o kregiñ gant TRE- pe gant LANN- (kartenn II) ; gwir eo ne c'heller ket amañ barn en un doare heñvel, rak estreget parrezioù a zo o tougen anvioù o kregiñ gant ar gerioù-se ha neuze, evit barn, e vije bet ret ivez dougen an holl re all-se war ar gartenn, ar pezh a vije bet diaes.

Kemeromp ar gerioù-se dre urzh niver ar parrezioù a zo o anv o kregiñ ganto bremañ :

LANN eo marteze an hini diaesañ, rak ar ger-se a zo dezhañ meur a dalvoudegezh. En hor yezh a vremañ e vez graet gantañ dre-st-holl evit envel ur blantenn dreinek hag a gresk en douaroù treut (Ulex), el "lanneier" evel ma vez lavaret. Ne deo ket aze avat talvoudegezh orin ar ger. N'eus ket a gemm evelato etre anv ar blantenn hag al Lann- en deus roet o anv da veur a hini eus hor parrezioù ; ha kement-se a zo lakaat anat gant ar c'hemmadur a vez graet e penn ar ger o tont da heul : daoust m'en deus ar ger "lann" un dalvoudegezh hollek (o vezañ santet evel gourel eta) e vez graet ar c'hemmadur evel ma vije gwregel ar ger : lann bil, lann dan, lann dev... E kembraeg bremañ e talv ar ger kement hag "iliz" pe "bourc'h" hag er penn kentañ e talvez moarvat kement ha "tachenn zouar" hag a droas diwezhatoc'h da z"douar santel". Hag an dalvoudegezh-se eo an hini a c'hellfe bezañ an hini a gaver en anv hor parrezioù. Ne deo ket avat el "lannoù" hag a zoug anv darn eus parrezioù Treger, Lann Bloubêr, da skouer, pe c'hoazh : Lann Gawan, Lann Vear, Lann Serwel, Lann Blufur... Santout a reer en anvioù-se an dalvoudegezh "tachenn zigor", hag e vefe 'ta al lannoù-se da dostaat ouzh hol lanneier a vremañ. En enep ez eo "douar santel" eo a ranker klask en anvioù evel landreger, Landerne, Langoned, Lanhouarne, hag all.

Ma tenn lann d'an douar, e tenn TRE kentoc'h d'an dud, dre orin (tostaat ouzh ar galleg "tribu"). En istor an Iliz e Breizh ez eo bet implijet tre evit envel ur rann eus ur barrez vras ; hag an dalvoudegezh-se eo a gaver e lavarennoù evel : an Dre, an Dre Nevez, Penn an Dre, hag all. Meur a lec'h e Tre- a zo avat ha ne deo bet biskoazh un dre-iliz ; met aes

eo kompren an emroadur pa ouezer e oa eus al lec'hioù annezet gant o anv e Tre- ar re bouezusañ eus lec'hioù ar barrez, hag an dalvoudegezh kozh eo a gaver moarvat en anvioù 'zo evel an Hendre. Ret eo kompren eta an anv "tre" evel hini ur greizenn boblañ e penn kentañ donedigezh ar Vrezhoneg er vro. Tre eo a vez kavet bepred e penn kentañ un anv (e kembraeg ivez), met er skritur hengounel e kaver en degouezhioù all treff, ar pezh a veñ treñv e brezhoneg bremañ, hag ar stumm-se eo a gaver dindan an anv-tiegezh "Dréau". Deuet e oa, ur mare 'oa, tre da gaout talvoud-gezh hor ger "kêr" bremañ el lavarenn "Chom er gêr", ha chomet eo bev en hor yezh pemdeziek dindan ar stumm a-dreñv. Mont a dreñv a oa eta er penn kentañ : mont d'ar gêr.

Ha kaver bremañ parrezioù niveruzik a zoug un anv o kregiñ gant Lann ha Tre (hag hiniennoù all a echu o anv gant ar gerioù-se, evel Moelan pe Koc'h-tre), n'o deus koulskoude eta o anvioù da welout war-eeun gant re ar plouezioù, ar re-mañ o vezañ bet e gwirionez un dra dibar en hon istor ; lec'h a zo da grediñ zoken e oa meur a lann ha meur a dre bet savet kent na ve bet rammet ar vro e plouezioù, ar pezh na vir ket e ve bet savet re nevez diwezhatoc'h, lannoù dreist-holl, rak ar re-mañ a c'heller gouzout un draig bennak diwar o fenn en ur studiñ buhezioù kozh hor sent. Lambaol Buis, hini Plouarzel hag hini Gwitalmeze a verkfe diazezedennoù graet gant sant Paol Leon adalek ma tilestras betek ma tizhas Kastell ma savas an eskopti nevez.

Mat eo teuler evezh e kaver lec'hioù o tougen un anv war un dro "lann" ha "tre" ennañ, evel Landrevarzeg ha Landremel, ha meur a hini all ha ne dint ket deuet da vezañ parrezioù (Landrevelen, Landreveneg, Landrevazeg, Landreviri...), ar pezh a vefe a-du gant lavarout e vefe alies koshoc'h an anvioù e Tre- eget ar re e Lann-, an anvioù-se o tennañ d'ar re meneget uheloc'h, evel Lann Blouar... enegiañ a c'heller ivez koulskoude e c'hell Lann bezañ ger diazezed an anv evel e Gwiklann, Foullann, Kulann, hag all.

Marteze e c'heller c'hoazh ober meneg eus traoù souezhus a-walc'h, ha ne c'hellont ket bezañ koulskoude diwar zepeuzh : e Leon e kaver ur barrezig anvet Trebabu, hag a zo bet disrannet, hep mar ebet, diouzh Plouvozer ; e Treger e oa Fabu ivez un de eus Plouvozer !

Kêr, hag a zeu goude e roll ar parrezioù, a zo ken ledet ma tennañ er penn kentañ holl evit envel al lec'hioù annezet. E-mesk ar parrezioù n'eus moarvat nemet unan hag a vefe bet ur barrez a-gozh : Karezeg, hag ar maezioù a oa en-dro dezhi a oa bet graet anezho Plouêr. Ar stumm ker- evit "ker-" a zo bet miret dreist-holl er vro c'hallou : "Carfantin", stok ouzh Dol (=kerfeunteun), "Carentoir"... Hag an R a c'hell zoken treiñ da L : "Calorguen", e-Richen Dinan, a vije evit "Kerorwen". Ar gudenn-se eus endro ul lizherenn en eben a vez kavet e Goueled Breizh, ha ne vije ket souezh e vije meur a hini eus an anvioù o kregiñ gant ker- o tont diwar anvioù e Ker-, ar pezh n'eo ket evit aesaat kudenn an anvioù e Ker-.

BOD, en, a zo ur ger bet un tamm dilezet gant ar glaskerien betek-hen, marteze dre ma soñjed n'en devoa ket a bouez en istor hor parrezioù. Gwir eo ne deo ket stank-bras niver ar

parrezioù a grog o anv gant Bod-, hag evel an holl c'herioù all meneget er-maez eus Plou- ha Gwik-, ez eus kalz muoc'h a anvioù o kregiñ gant Bod- war ar maez ; ha souezhus a-walc'h eo gwelout ez eo stankoc'h an anvioù-se diouzh tu ar gevred. Rak, mar e ver 150 Bod meneget evit departamant ar Finistère, ez eus 185 er c'hoates-du-Nord hag ar Norbinan a zo trec'h gant 354 anv o kregiñ gant ar ger-se.

Gant ur ger hon eus d'ober aze hag a zo anavezet-mat c'hoazh er yezh vev (reiñ bod da unan bennak), hag e gavout a c'heller ivez evel anv distag : ar Vod. Ur ger gwregel eo eta. Met en un anv bennak e c'hell bezañ bet mesket gant ar ger bod gourel, ar barr pe bod keuneud a verke dor un davarn bennak (chapel ar Bod-ilio !), met dre vras e seblant ar ger Bod merkañ ul lec'h gwarez pe ul lec'h sakr en-dro d'ur chapel bennak, marteze al lec'h santel m'en em dennas ar sant a zeu e anv da heul da ober pinijenn. Hag abaoe va yaouankiz em boa anaoudegezh vat gant Bokenal, ma enored enni sant Venal (Bod + Gwental eta). Bez' e c'hellfe seurt anvioù bezañ eta e-touez ar re gentañ bet roet da lec'hioù annezet hor vro. Evel Lann ha Tre ez eo anavezet mat ivez ar ger-se en tu-hont d'ar mor, ha ma teu deoc'h sellout ouzh ur gartenn a Gerne-Veur e welot warni lec'hioù evel "Bodmin", "Bodinnick" pe "Botallick"...

Ar parrezioù hag an anv a zougont

E-touez an anvioù-lec'h koshañ bet diazezet gant hor c'hentañ doù pa zeujont en tu-mañ eus ar mor da sevel ur Vreizh nevez enañ eta an anvioù bet gwelet betek-hen, hag int o kregiñ gant ar gerioù Plou-, Tre-, Lann-, Bod-, koulz hag evit un darn eus ar re a grog gant Ker-. Hag en o zouez ez eo Plou- ar pouezusañ evit ar pezh a sell ar parrezioù a savjont ur wech ma oant diazezet mat a-walc'h evit reiñ ur stern hag un urzhiadur d'o c'hevredigezh. Ar barrez, ar blous eo a zlee bezañ e-doug hantvedoù diazezed an urzhiadur-se. Muoc'h e et an eskoptioù hag a voe mui pe vui adkemeret diwar re ar deodedoù gall-ha-roman, da vihanañ en na voe savet eskoptioù "breizhat" Leon, Treger, S. Brieg ha S. Maloù.

Ar plouezioù bet savet er penn kentañ a oa alies bras, ma keñverier anezho gant ar parrezioù a vremañ, moarvat dre ma oa stlabezet a-walc'h an dud enno, ha dre-se ivez ez int peurliesañ brasoc'h e diabarzh ar vro eget en arvor. Gouzout mire eo bet ar parrezioù savet adalek ar mareoù kentañ n'eo ket bepred gwall aezet, ar pezh a zo sur hepken eo e oa en o zouez an holl re a grog o anv gant Plou- (nemet, marteze, ar re anvet "Plounevez", hag a c'hellfe bezañ bet savet diwezhatoc'hik). A-hed ar c'hantvedoù, dre ma kreske niver an dud, hag ivez dindan levezon tud a-bouez, aotronez ha menech, e voe savet rannoù nevez, darn anezho evel "treoù" eus ar barrez kentañ, darn all o tont da vezañ parrezioù evit mat.

Diazezed ar parrezioù kentañ a zo warnañ liv an urzh. Evel bevrennoù o devez peurliesañ troc'hioù merket mat, traoniennoù don pa vez tu, met a wechoù ivez kribennoù gouez evel re Venedez Are, pe c'hoazh roudenn anat un hent kozh. Pe ivez ur c'hoad bras didreuzus. Met an harzoù a voe kavet ar gwellañ eo dre vras troc'hioù don ar stercioù, gant ar geunioù a vez

war o hed. Anat eo ez eo bet savet ar plouezioù gant tud a vicher pe gargidi o deus kaset da benn ul labour trevadennerien emskiantek. Ur skeudenn eus o labour a c'hellomp gwelout er pezh a gasas da benn, en naontekvet kantved, an dud a zegouezhe e broioù damc'houllo Amerika : rannañ a rejont ar vro en ur gemer evel diazez al linennoù hed hag al linennoù led ; hag en Afrika e voe dastroc'het ivez damheñvel ar broioù trevadennet. Hon tadoù, avat, berroc'h o skiant d'ar mare ma teujont, a chomas testoc'h ouzh an natur, ha gwellañ bevennoù a gavjont evit o flouezioù a oa al linennoù merket gant an dour.

L'vel pep labour urzhiañ ne oa ket peurvat o hini, na ne c'helle bezañ. Ma krogas d'en em strewañ, er penn kentañ, ar bras eus ar boblañs war an uhelgompezennoù ma kavent an douar gwellañ evit o zrevadoù hag evit o loened, ne c'hellent ket bevañ hep darempredoù etre ar rummadoù. Hag e voe en traonioù lec'hioù a-bouez-bras ma krogas an dud da chom : ar rou-ouziou pe ar pontoù a oa lec'hioù ma ranke kalz tremen, hag alies kaout bod ; ha bez' e oa ivez, ha dreist-holl marteze, ar porzhioù e devn an aberioù. Diwezhatoc'h e savas ivez kestell ha, da heul, kêrioù ha marc'hadou.

Kêrioù nevez, pe diwanet diwar un diazez kozh, en em gavas neuze war gresk, hag o kemer pouez e-keñver ar maezioù a ziwar-dro, met, evel ma oa bet rannet ar vro a-ziagent, en em gavas ar c'hêrioù nevez, lies a wech, troc'het e meur a damm evit ar pezh a sell servij an eneoù, tammoù o tennañ a-wechoù zoken da eskoptioù disheñvel. Landerne en em gave evel-se troc'het e tri zamm : ur barrez, Sant Houardon, bet disrannet a-gozh diwar Blouedern ; ivez e Leon, un dre stag ouzh Flouziri, Sant Juluan ; e Kerne ur barrez all, Sant Tomaz, hag a oa ur rann gozh eus Dirinonn. Heñvel e oa evit Montroulez, ma kaved enni ivez teir farrez : unan e Leon, Sant Varzhin ; div e Treger : Sant Vazhe o vezañ un disrann eus Flourin ha Sant Malani diwar Blouyann. Heñvel e oa ar stad evit Kastelladren pe Gempelle, koulz ha Plankoad.

* * *

L'vel ma 'z eus bet lavaret diagent ez eo eil rann an anv-lec'h peurvuiañ un anv-den. Ha lavaret em eus ivez e chelle marteze ivez bezañ gwir evit anvioù evel "Flounevez". E gwirionez ez eus tu da brederiañ er c'heñver-se war meur a rumm anvioù.

Setu un nebeud :

- Gwinevez, Plounevez, Kastellnevez, Lannevez ;
- Fleuveur, Treveur, Lanneur, Bonneur ;
- Fleuvian ("Flouvian" Leon a zo disheñvel) ;
- Plougastell, Tregastell -- Brelez, Trelez, Kamlez ;
- Langoad, Kergoad, Leskoad ;
- Flovalaneg, Plouvalaneg ;
- Lanniliz, Bodiliz, Kerniliz, Breniliz...

Kentañ tra a soñjer eo hon eus aze gerioù o toareañ un anv, anv ur barrez pe ul lec'h all, evel ma 'z eo anat e lavarou evel Ti Nevez, Kêr Nevez pe Kozhker. Pe daoust ha neuze e vije tu da welout enno ivez un anv den ?

N'eus arvar ebet da gaout pa vez re anat talvoudegezh an anv evel ma vez e Perroz pe Pempoull, pe c'hoazh e Benodez pe anvioù all a-hed ar stêrioù evel Traculeger, Troaon pe Traon Elorn. Ne vez ket ken eeun an traoù e pep lec'h avat zoken pa vez da ober gant gerioù hag a ve lavaret ez int sklaer diwar ar c'hentañ sell evel Banaleg ha Klegger pe Klegereg ; aze e vimp techet diouzhtu da grediañ e vint bet anvet evel-se dre ma vo bet kalz banal war zouar an hini gentañ, ha ma vo bet en div all klegger (= tachennadoù mein blat) heverk-tre. Evit an eil rummad ne vije netra a-enep, met evit an anv kentañ e vezer nec'het o kavout an anv douget gant div barrez pell an eil eus eben, en tu-hont d'an hini a zoug an anv "Banaleg" e berr, Flouvalaneg en norzh, ha Flovalaneg er mervent. Daoust ha neuze ne c'hellje ket un anv evel Banaleg bezañ bet un anv-den ? Dreist-holl ma anavezer kalz anvioù tud en -EG.

En em c'houlemañ a c'heller ha ne vije ket gwir zoken evit gerioù evel meur, bihan, nevez, ha zoken lez, kastell, koad, (evit iliz e vo gwelet pelloc'h e c'heller kaout un disple-gadur all), rak koulz gwechall ha bremañ e oa moarvat stank an dud hag a veze anvet Meur ha Bihan, pe zoken Koad ha Kastell. Ne c'heller nemet bezañ souezhet e kaver da nebeutañ teir flougastell hag un tregastell e-touez parrezioù Breizh.

Ha petra a zo da soñjal diwar-benn Gwinevez pe Plounevez ? Meur a hini a zo :

- E Leon emañ Gwinevez Lokrist.
- E Treger, Plounevez Koedeg.
- En eskopti S. Brieg e kaver ivez "Fléneuf", hep komz eus Lannevez, hag a oa ur stagadenn eus Dol e Flouvalaneg.
- E Kerne, erfin, e kaver teir : Plounevez Kintin, Plounevez Forze ha Plounevez ar Faou, pep hini o vezañ disheñvel gant anv ar gontelezh ma oa stag outi. Hag en hounañ ziwezhañ eo en em gave ivez Kastellnevez ar Faou.

N'eus forzh penaos, zoken ma 'z int anvet "nevez" ez eo ar plouezioù-se un dra gozh en istor ar vro. Daoust hag avat ez eo sur e vent bet "nevez" ur wech bennak ? E Leon e kaver, gwir eo, un "Henvig", hogen n'he deus ket da welout gant Gwinevez ; hag an anv stag ouzh hounañ bremañ a zo hep mar ebet kalz yaouankoc'h eget anv ar barrez ha ne vez graet gantañ nemet pa vez ret lakaat kemm gant ur Plounevez all bennak, hag a verk hepken eo bet adkemeret Lokrist er barrez pa ne oa mui e dalc'h un abati. N'blec'h ne weler un "Henvig" pe ur "Flougozh" e-kichen an hini nevez. Soñjal a c'hellfed e ve bet savet er forze Plounevez diwar goust Ploeven, hag a zo bihanik evit ur bloue, met kavout a reer e lec'h all plouezioù ken bihan, evel Flewenon ha Fleherel en eskopti S. Brieg. E Treger ez eus ivez ilcoulec'h, ha ma ne vije bet ar "plou" en anv e vijed techet-bras da lavarout ez eo un disrann eus Plouvilio. Ar vent ne deo ket eta un abeg mat ev t reiñ ur respont. Hag e Treger en deus doare an anv "Koedeg" da vezañ un anv-den. N'blec'h eta ne weler diwar pe barrez kozh e ve bet savet ar bloue "nevez", pe diwar pe zarn eus ar vro ha ne oa ket bet lakaet c'hoazh er "stern".

Kemeromp Plounevez ar Faou da skouer, dre ma kav din e chell honnezh bezañ an hini gentiliañ. Plounevez a zo bet anezhi ur pezh parrez ; ken bras e oa ha Fleiben en tu all da stêr

Wanez. Plonevez a oa enni a-gozh n'eo ket hepken douar ar barrez a-vremañ, gant ar C'hilioù ha Sant Herbod, met ivez Lokevred hag ar C'hastellnevez, koulz ha Landelo ha Kollereg. Diwar pe barrez kozh e c'hellfe 'ta bezañ bet istaget ar bloue "nevez"-mañ ? Diwar Berrien ? Pe diwar blouie? Houmañ a zo bremañ kalz bihanoc'h eget Plonevez, zoken ma lakaer evel ma 'z eo bevennet Plonevez mat-t e a bep tu ivez gant stêr Aon ha stêr Wanez, e doare ma ne chom arvar war he bevennoù nemet diouzh tu Lannedern. Koulskoude ez eus war zouar Breniliz ur gêr anvet Plouenez pe "lloenez", pe c'hoazh "Flouenan" hervez un testenñ bennak (keñvriañ neuze ouzh Bodenez-Bodenan). Diaes a-walc'h ez eo krediñ koulskoude e vije bet aze kreizenn ur bloue, kreizenn hag a vije bet la aet diwezhatoc'h e Breniliz. Mar deus bet unan ez eo ret mat krediñ e oa ivez Berrien e-barzh. N'emañ ket Plouenez g all bell eus an hent-kozh a gas eus Karaez etrezek Sizun, gwir eo ; met souzhus eo evelato e ve bet ar greizenn war gribenn ar menez kentoc'h eget war an douaroù kalz gwelloc'h hag a gaver e diazenn ar stêr Aon. Souzhus ivez e ve just war vevenn ar bloue "nevez" ivez ur c'hastell "nevez". Techet e vefen eta da grediñ ez eo kentoc'h un d n anvet Nevez hag a savas koulz ur bloue hag ar c'hastell. Dreist-holl ma kaver en arvor Kerne ur barrez all anvet Nevez berr-ha-berr, hag ivez, stok ouzh Plougêr, unan all anvet Plounevezal, an anv-mañ a vezañ da blounevez ar pezh eo Plougernevel da blougerne(v).

Damheñvel eo ar gudenn evit pezh a sell n anv Langoad, a zo douget gant ur barrez a vro Dreger, ha gant un all a vro S. Maloù ("Langouet"). Ket douget eo c'hoazh an anv-se gant ul lec'h all a Dreger (Boulyriag), unan a Leon (Logeginer Plouneour) ha tri a Gerne (Rosloc'han, an Ospital, Beuzeg Konk), ha bez' e kaver ivez e Kembre da nebeutañ ur barrez anvet "Langoad" (en Enez Von). Ha da venegiñ emañ ivez ar peder Tregoad a gaver e departamant ar Morbihan, koulz ha Bodkoad (1 er Finistère, 1 er Cdn, 5 er Mbh) pe Kergoad hag a gaver 51 er F, 12 er Cdn ha 12 er Mbh.

Lavaret em eus e oa sur-mat disheñvel an traoù evit an anvioù oc'h echuiñ gant -iliz (Lanniliz, Bodiliz, Kerniliz ha Breniliz). Aze e ranker gwelout un testenñ eus ur c'hemm hag a zo c'hoarvezet, pe en anv ar barrez, pe el lec'h ma vez graet an ofisoù. An anv kentañ a zo bet lakaet e-lec'h Plouziner, hag a oa bet ankounac'haet tamm-ha-tamm pa oa bet lakaet Landeda da barrez, an eil a zo un disrann eus Gwika, an trede a veze anvet gwechall Kervavan, met evel ma ne oa ket an iliz e-kichen ar c'hastell brudet a zouge an anv-se, e kemas ar vourc'h un anv nevez, ar pevare a generas (marteze) plas Plouenez pa 'z eas houmañ da fall, mar deo bet e gwirionez ur bloue.

Aecoc'h e vije bet hep mar ar studi ma vije bet peurleniet an tachad douar bet gounezet gant ar Vrezhonad gant kement a rann e .lou- ha ma 'z eus bet a barrez-orin. Kement-se avat ne c'hoarvezas biskoazh. Lec'hioù a zo hag a viras an anv a zouget kent na zegouezhas ar boblad nevez, kalz ivez a voe roet dezho da anv hini an den-mañ-den, hep meneg ebet dirak. An danvez-se eo a vo meret er pennad da heul.

Anvioù parrez hep rakger

re en -EG ha re en -AG

E-touez an anvioù o tennañ d'ar parrezioù ez eus ur rummad a-bouez, hennezh eo hini ar parrezioù hag a zoug un anv, dre vras un anv den, hep ger doare ebet dirak, na Flou, na Tre, na Lann, na Bod, na ger all ebet. An anv-se a c'hell a-wechoù bezañ berr-tre, evel Roz, Laz, Aur, Bay, Belz, Brest, Brec'h, Frad, Mael, Kast, Brug, Gwern... darn all hiroc'hik evel Gourin, Speied, Kleden, Kawan... Meur a hini a zo stag outo dibennoù anat evel -AN : Broc'han, -CN : Arzhon, -EL : Berwel, Kernevel, ha dreist-holl en -EG : Beuzeg, Ha'veg, Louaneg, ar Galvaneg.

Hiniennoù a zo anvioù kozh, o tont eus an amzer a-raok ar brezhoneg. En o zouez e ranker moarvat lakaat anvioù an inizi evel Lusa, Sun, Groae, marteze Baz(h) ha Briad. Gouzout a reer ivez eo kement-se gwir evit anv ar stêrioù evel Elorn, Leger, Izol, lle, Out...

Petra eo talvoudegezh anvioù evel Konk, Kloar, Urge? Hag hini Sizun pe Sibiril? Ha gerioù all a zo hag a laka neket ar c'hlasker, evel anv Taole, e Leon. Ha berak ez eus eno un "Henvig"? Un diskoulm a zo bet kinniget : bez' e vije bet dre eno ur c'hornad (un taolead ?!) a vije chomet bev ennañ ya-h ar Romaned pelloc'h eget er peurrest eus ar vro, ar pezh en devije roet tu d'un anv latin en -acum da dreiñ en -e, evel e tro Roazhon pe Naoned, ha neket da chom -ag evel er rann eus ar vro bet brezhonekaet. A c'hellfe bezañ gwir ivez evit le-c'hioù all evel Redene, Berne, tene. Hag ar pezh a zo gwir evit an anv diwezhañ-mañ a c'hellfe bezañ gwir ivez evit an anvioù all o kregiñ gant s + vogalemm : Larzhav, Surzhur...

Anv kêr vrasañ Goueled Breizh, Brest, a zo chomet dizispleg betek-hen. Kavout a ra din ivez e tle bezañ un anv-den. Kavout a reer e parrez Placran g (Plouvalaneg) ul lec'h anvet Lanvrestan hag a roje da grediñ ez eus bet eta un anv Brestan gwechall, un anv hag a ro aes-tre "Brest" ma tenner kuit an dibenn -AN (evel en daouadoù Reun-keunan pe Ken-kenan). El levrioù istor e lenner e oa eno o ren ur roue anvet Bristok, un anv ha, a zo aes gwelout dindanañ ar stumm Brestog pe Bresteg, unan eus an anvioù-se en -EG ha a zo ken niverus. Ha dre setu ma kaver er rolloù bet embannet gant F. Gourvil an daou anv "Brest" ha "Brestec" douget c'hoazh bremañ gant tud 'zo. Anat eo e c'hellfe ivez an daou anv-se bezañ bet roet da dud hag a oa o chom e Brest, met souzhus eo memes tra gwelout an anv Bristok meneget e buhez sant Derc'hen ha sant Neventer.

Unan bennak eus an anvioù a zeu, anat eo, diwar doareoù ar vro, ha den ne day da glask un anv-den kozh dindan Douarnenez, Kemper pe Gwengamp. Evel se eo e ranker displegañ ivez moarvat anvioù hag a zo bet roet a-gozh evel hini Frad, e Dreger, ar pezh ne vir ket an anv da vezañ douget bremañ gant meur a zen. Duot, e Kerne, a zo da vezañ displeget evel-se ivez d'am me- no ; a walc'h eo bezañ bet tremenet dre ar vro evit kompren an anv-se pa weler an diribinoù koadek ha teñval (du eta) a

zo oc'h ober un hanterkelec'h en-dro da uhelennoù Festivien. Bourc'h kengrist a zo war an diribin pe aot-se, hini S. Dervez ivez (skrivet e vez peurvuiañ ar ger-se "aod" bremañ, met ma seller ouzh istor ar ger, hag ivez ouzh doare distagañ al liester : "ao(t)chou" ha neket "aojou", e weler ez eo gwella ar skritur gant T, evel ar ger gant -- ar skritur ofisiel uault a zo kentelius evit heuliañ treuzfurmadur an anv-se). Techet e vezer bremañ da grediñ n'eus aot ebet nemet e-kichen ar mor, met evit hon tadoù e oa ivez e diabarzh ar vro.

Ar pep brasañ avat eus ar parrezioù gant un anv distag a zo dezho neuze un anv-den. Lvit gouzout pere a c'hellfe bezañ eus ar seurt n'eus nemet sellout ouzh ar gartenn III. Er rumm-se e lakaan anvioù evel Kast, Laz, Argol, Korle, Kore, Leuc'han, Melwen, Kerien, Berrien, Eder'n, Kombrid, ha zoken un anv evel Tourc'h a zo, a gav din da lakaat er rumm-se. Anat eo kouls-roude e c'heller bezañ nec'het gant meur a hini.

Kalz eus an anvioù-se a denn da barrezioù orin, ha se a zo gwir moarvat evit Gourin, Laz, Brec'h, Mel (estivien), Lliant, Argol, Kraozhon, Berrien... Darn all avat a zo anv un dre pe ur barrez nevesoc'h evel Goulec'hen pe Karanteg, e Leon, Gwengad e Kerne, pe Arzhon e Gwened. Lavaret en eus e c'helle darn eus an anvioù-se bezañ enno un dibenn, evel Gwenzhan, Kuzon, Gwezhennoù, Kernevel, ha dreist-holl an dibenn -EG (da gentañ e oa -og, hag ar stumm tremen dre en a vez kavet er vro c'hallou didan meur a skritur : "euc", "-euf" pe "-eux").

Er rummad anvioù-lec'h en EG-se eo em eus kavet skouerioù evel Banaleg pe Klegereg evit diskouez pegen skoemp e c'hell bezañ gwechoù 'zo gouzout petra eo talvoudegezh un anv. An hor yezh e ro an dibenn -eg ur perzh d'ar ger (gwelit anvioù-tud evel Blevag, Taleg, Lagadeg, Frieg, Skouarneg, Suzelleg, Keineg, Glineg, Troadeg...). Anat eo ivez ne vez ket kavet an dibenn-se hepken en anvioù evel Pederneg, Skivieg, Karanteg, Beuzeg, Louaneg, met ivez en anvioù all evel Tregaranteg, Bollazeg, Flabenneg, Breventeg, Sant Tegoneg...

A bouez bras evit istor ar Brezhoneg eo ivez an dibenn -ag. A-orin gant -eg eo, met dont a ra diwar al latin, ar yezh-mañ o vezañ he c'hemeret digant ar gallianeg. Talvezout a reas an dibenn -acum (ha -iacum ivez) da envel an domanioù pe "fundi" gall-ha-roman, ha staget e veze an dibenn-se, evel en hon anvioù brezhonek en -eg, ouzh anv perc'henn al lec'h, hag a oa dezhañ, anat eo, un anv roman, pe romanek. Dre sellout ouzh ar gartenn e c'heller gwelout diouzhtu pere eo al lodennoù eus ar vro ma oa chomet kreñv enno dalc'h ar Romaned (pe e tu gwalarn ar vro, ma ne weler nemet milizag hag Irvilhag o tougen un anv gant ur seurt dibenn, n'eus parrez ebet e Tregar, n'eus nemet unan en arvor eskopti kozh S. Brieg. Stank e teu an anvioù-se da vezañ avat en eskopti S. Maloù ha, dreist-holl en tu-hont da Wened war ar gevred, kouls hag e bro Naoned.

Er rann eus Breizh ma n'eus bet brezhoneget gwech ebet eo troet avat an dibenn latin -acum en "-é" pe "-ay" : Vitre, Parcé, Luitré, Aubigné, Martigné, Savenay, hag all. Ur sell war ar gartenn a ziskouezo pegen stank eo an anvioù parrezioù oc'h echuiñ gant -é en eskopti Roazhon evel ma oa a-raok ma oa bet staget outañ ul lodenn vat eus hini Sant Maloù.

A-barzh echuiñ gant an anvioù en -ag e fell din menegiñ e kaver e Kerne ur barrez hag a oa, war a greder, an anv anezhi oc'h echuiñ evel-se daoust ma kaver bremañ -ag e-barzh. Brieg eo ar barrez-se, ha krediñ a c'heller ez eo bet levezonet an anv gant hini sant Brieg pe hini sant Briag. Er pevarzekvet kantved e veze skrivet an anv "Briziac" pe "Brizyac", ar pezh a ro tu da grediñ e teu diwar ur Brittiacum bennak, un anv a genglotfe gant "Breizhag" bremañ. Peadra a zo eta d'en em c'houlenn hag-eñ ne vije ket bet fiziet ar font roman-se en unan eus ar Vreizhiz kentañ deuet d'en em ziazezañ en Arvorig. Ledan-kaer e ranke ar font-se bezañ, bevnet gant stêr Bier diouzhtu ar c'huzh-heol, gant an Oded diouzhtu ar c'hreisteiz, ha moarvat gant kribenn ar "Venezioù Du" en norzh, da vihanañ ma ne 'n em astenne ket betek stêr-Aon. Ha pa zegouezhas ar Vrezhoneg e voe buan distaget, da grediñ eo, parrez nevez Ldern diouzhtu hini Brieg. Souezhus eo gwelout pegen tost emañ an div vourc'h an eil ouzh eben, peogwir n'eus ket 1700 m etre an daou dour. Hag evel m'emañ bremañ komun Brieg ez eo ret tremen war zouar Ldern evit mont d'ur rann anezhi (Kervadored, hag all) hag a zo evel un enezenn abaoe m'eo bet distaget Landudal ha Langolen diouzhtu Brieg; ar re-mañ a oa div dre eus Brieg betek kenemglev 1801, evel ma oa ivez Kilinen. Landrevarzhag, gant he zre Trelez a oa bet lakaet abretoc'h da barrez, met da heul emglev 1801 e voe graet un eskemm, Landrevarzhag a gemeras douar Kilinen, tra ma voe roet S. Wenole Trelez da Vrieg en-dro.

Ar parrezioù hag al lec'hioù e LOK-

(Kartenn IV)

Hervez meno Joseph Loth ha René Largillière e vije yaouankoc'h an anvioù parrez-se eget ar re o kregiñ gant Flou-, Tre- pe Lann-, hag her c'hrediñ a-walc'h a rafen ivez. Evit bezañ adu ganto n'eus nemet sellout ouzh ar gartenn, hag e weler ez eo tost da vat dianav ar rakger-se ar-maez eus ar pezh a zo deuet da vezañ Breizh-Izel hon amzer. Un tammig souezhus eo zoken, rak n'eus ket da grediñ evelato e ve bet ar vevenn distro ken tost diouzhtu ar goueled en unnekvet pe en daouzekvet kantved.

Bezet a vezo, ne zivanas moarvat an anvioù "Log" roet da lec'hioù pediñ nemet goude ma voe adsavet ar vro ur wech ma voe argaset evit mat ar breizerien deuet eus an Norzh; a orin latin eo ivez an anv-se, o talvezout tost da vat kement ha lec'h, bev eo chomet c'hoazh ar ger "log" er yezh a-vremañ e-kichen al loch hag a zo deuet diwar ar galleg (ha kavout a ra din e ranker lakaat er rummad-se ar ger logell = ur pezh douar kloz).

N'eo ket hepken anvioù brezhonek eo a gaver stag ouzh Lok. Tri anv e-touez ar re vrudetañ : Lokmaria, Lokrist ha Lokmikaël. E Gwened eo e kaver an niver brasañ a Lokmaria hag er Morbihan 25 anezho, tri o vezañ deuet da vezañ parrez. En departamant-se e kaver ivez trizek Lokeltag, ar pezh a zo dleet moarvat da vrud abati Ruiz. Lokrist, en enep e vez kavet stankoc'h e departamant ar Finistère, ma kaver an anv-se eizh gwech, en o zouez Lokrist an Izelved Leon, met bez' ez eus ivez 5 er CdN ha 3 er Morbihan. ar muiañ Lomikael ha Loperc'hed

a gaver ivez er Morbihan, tra ma verk Lokenole (5 en holl) brud abati Landevenneg.

Un nebeud anvioù a zo hag a zo arvarus e ve enno al Lok-, Loumergad, da skouer, pe c'hoazh "Loutehel" er vro c'hallou. Marteze e krogje an anvioù-se gant Loc'h (= lenn), daoust ma seblant bezañ gwall rouez an anv-se en envel lec'hioù, nemet an anv Kerloc'h, en arvor, koulskoude!

Anvioù o kregiñ gant SANTI

Ne ran meneg eus an anvioù-se ken niverus nemet evit lavarout ez eo disheñvel evidomp anv meur a lec'h hag a grog e galleg gant "Saint".

Evel-se Lannurvan a vez graet anezhi Saint-Urbain e galleg hag, er memes korn-bro, e teu Langristin, e parrez Plougastell, da vezañ Sainte-Christine e galleg. E Treger, ar pezh a zo evidomp Lomikael an Traezh a zo bet lakaet da vezañ Saint-Michel-en-Grève. Meur a skouer all a vije kavet hep mar, hag un dra vat e vije sevel ur roll eus an disheñvelderioù-se.

Menegiñ a rin ivez e c'hell tud ar burevioù lakaat ar sent da dreiñ e sentezed. E Leon ez eo bet lakaet evel-se Sant Sev da vezañ Sainte-Sève, hag e Kerne Uhel Sant Trifin da vezañ Sainte-Tréphine.

Un drev a barrez Gourin a vez graet anezhi ar Sent en hor yezh ha "Le Saint" e galleg, ha diwar un abeg heñvel ez eo deuet Kersent da vezañ "Kersaint".

ANVICU A BEP SLURT

al lec'hioù ren. Kestell hag aotronez

Mar geller krediñ ez eo an anv den a gaver da heul Flou-pe Lann anv un den santel ez eo koulskoude anv un den all eo a gaver er pep brasañ eus an anvioù-lec'h, zoken ar re a grog gant Tre- pe Bod-. Ma c'helle un den dister reiñ e anv d'al lec'h ma save e lochenn, ez eo koulskoude anv an dud a-bouez eo a zo bet staget da gentañ ouzh anv al lec'h ma oant o chom. Rak a-viskoazh ez eus bet er vro lec'hioù ren hag urzhiañ, e-kichen urzh an iliz e oa ivez urzh an aotronez, dreist-holl diwar an deket pe an unnekvet kantved pa voe savet kestell un tammig e pep lec'h.

Er penn kentañ e c'hell bezañ bet G'IK anv al lec'h ma oa an aotrou o ren er barrez, pa oa c'hoazh anat un tamm bennak levezon ar Romaned. Met bez' ez eus un anv hag a gaver dre holl, dre ma tenn d'ar reizh ha d'ar galloud barn; LEZ eo an anv-se, doare koshañ an anv a seblant bezañ bet Lis. Kavout a reer a-wechoù an anv distag (al Lez), hogen aliesoc'h e kaver da heul un anv-den evel Lesneven. Dre vras e vez kavet skrivet 5 dirak ur gensonenn ha 2 dirak ur vogalenn. Hervez doare an anv a zeu da heul e kaver ivez, e-kichen Lez- ha Liz- ar stummoù Leuz- (Leuzeuregan), ha dreist-holl Luz- (Luzuverien, Luzunvez...).

E goueled Kerne dreist-holl eo ez eo stank al lec'hioù e Lez- hag a zoug anv ar barrez pe sant ar barrez :

<u>Leskoñv</u>	(<u>Flogoñv</u>)	<u>Leskast</u>
<u>Leslann</u>	(<u>Poullann</u>)	<u>Leswenac'h</u>
<u>Lezarle</u>	(ar <u>Yeuch Floare</u>)	<u>Leskleden</u> ar <u>C'hab</u>
<u>Lespern</u>	(<u>Lanvern Ploneour</u>)	<u>Lesveuzeg</u> - - -
<u>Lezivid</u>	(<u>Bodivid/Kombrid</u>)	<u>Lezoulien</u>
<u>Lezerge</u>	(<u>Erge Vras</u>)	<u>Lesveilhar</u>
<u>Leskraozhon</u>	(<u>Lanveog</u>)	<u>Lesvahalon</u>
<u>Lezargol</u>		<u>Lespurid</u>

Gwechoù 'zo, zoken, e kaver Lez- lakaet dirak an anv-parrez e Flou- : Lesploveur e Kerne, Lesplouenan ha Lesplougouloum e Leon. Lesnaleg, e parrez "Formaleg" (= Flovanaleg) a zo, peadra a zo da grediñ, evit "Lesvanaleg".

MASTELL an aotrou a zo bet e-pad kantvedoù arouez an nerzh. N'eo ket, koulskoude, bras niver ar c'hêrioù hag ar parrezioù a ve ar ger-se en o anv. Meneged eo bet diaraok an teir Flou-gastell hag an d'Tregastell. Bez' e c'heller c'hoazh koulskoude menegiñ Kastell-Paol, e Leon, hag e Kerne e kaver Kastellin ha Kastellnevez ar Faou. N'eus, en tu-hont da se, er rann bet komzet brezhoneg emmet Kastellnevez an Nouz, e Pouled. En tu-hont da se e kaver avat an anv Kastell douget a-walc'h, pa gaver meneged 62 e departamant ar Finistère, 40 all er CdN, ha 16 er Morbihan, ha c'hoazh ez eus bet gallekaet kalz re all a gaver dindan "Château". Mat eo ivez delc'her soñj e vez douget an anv Kastell gant kerreg bras a-hed an aod, evel Kastell Meur Flougouskant pe hini Beuzeg ar C'hab, pe c'hoazh Kastell Din Kraozhon, meur a hini eus ar begoù-douar anvet evel-se a zo bet anezho koulskoude lec'hioù-difenn en Henamzer. Kavout a reer ivez an anv-se implijet el liester ha bez' ez eus 9 lec'h anvet Kestell er Finistère ha 2 all er Côtes du Nord, koulz ha 5 Kistilli pe Kastelli.

KISTILLIG a seblant bezañ implijet dreist-holl evit envel kreñvlec'hioù kozh savet da ziwall an hentoù, pe neuze, evel ar galleg "Châtellier", hag a zo doare dezhañ da vezañ ar ger kendalvoud, e c'helle bezañ implijet ivez evit labouradegoù evel ar fornioù houarn.

ROC'H a zo da vezañ lakaet er rummad anvioù-se ivez, rak talvezet o deus meur a wech ar roc'hell da ziazezañ ar c'hestell. Setu ma kaver an anv ar Roc'h douget gant un dre gozh a Blouziri, hag e-kichen ar vourc'h e weler c'hoazh restadoù eus ar pezh a zo bet, hervez, kastell ar roue Morvan. Ar Roch a gaver e Treger a denn ivez d'ur c'hastell, a zo bet hini un Derrien bennak, ha kresket he deus betek dont da vezañ "kêr", ha war ar stêr a zo o tispartiñ Gwened diouzh Naoned e kaver ur gêr all, Roc'h Bernez. Met e Gwened e kaver ivez ur Roc'h-kreñv e parrez Fluhernin ha war harzoù ar Forc'hoed emañ "Roc Saint-andré" ha war ribl an Out e kaver ivez kêrig Roc'h-an. Doare-sevel an anv-mañ a c'heller tostaat ouzh hini Dinan (a vez peurvuiañ distaget "Dinan" gant ar vrezhonegerien).

DIN a zo un anv kozh o talvezout kement ha "lec'h kreñv"; met diaes eo lavarout ha bez' eo Dinan ur ger deveret pe neuze e vije un anv-den (a gaver en anv parrez Runan). Ar ger Din a gaver ivez en anv Dinargh, traezhenn vrudet ha porzh ma ti-lestras an dug Yann IV pa zistroas eus an harlu. An anv Kastell

Dourioù ha lec'hioù gleb

An hini stankañ a vije moarvat Pont, peogwir ez eus anezhañ ur savadur evit tremen aessoc'h a-se an traoniennoù hag al lec'hioù dourek. Da c'houde e teu Poull, Gwern, Prad, Stank, Gwazh, Roudour, Stêr, Lenn, Palud ha Froud. An anvioù enno G'ER ha Loc'h a zo diaes o niveriñ hag ar re e "Feunteun" a zo bet troet alies e galleg war ar paperoù.

G'ERN a zo ur ger keltiek anavezet-mat. E brezhoneg e vez graet gantañ dreist-holl evit envel ur seurt gwez (Alnus) a gresk en douaroù gleb ha trenk, ar pezh a zispieg e ve bet anvet meur a lec'h a oa "Gwern" e brezhoneg "Launay" pa yeas ar brezhoneg da get er vro c'hallou. E gwirionez e tenn anv al lec'hioù a vez graet "Gwern" anezho kentoc'h d'ar geunioù ha d'ar pradenoù gleb o-unan. E bro Roazhon e kaver ur barrez a zoug an anv "Vern", met bez' e c'hell dont an anv-se diwar ar galianeg, hep na ve ezhomm da lavarout e ve bet aet ar brezhoneg betek aze; mar bije e ve bet skrivet "Gwern", da grediñ eo.

Lvel ma 'z eus ur gudenn evit stagañ Ru ouzh Run ha Lin ouzh Lein, ez eus ivez unan evit tostaat G'ER ouzh Gwern. O vezañ dreist-holl ma 'z eo stabil-tre peurvuiañ ar strollad -rn e dibenn ur ger brezhonek. An eil hag egile a zo gwregel. Daoust hag-eñ ez eo ur ger disheñvel? Tu a vije bet da soñjal ar ger a vez skrivet "gouer" pe "gouver" er geriadurioù (hag a zo ivez moarvat unan eus anvioù stêr Lannuon, Leger o vezañ an hini anavezetañ), hogen ne c'hell ket bezañ dre ma vez distaget "ar ver" e Leon hag e Kerne; e-kichen "Guerneur" e kaver ivez skrivet "Verneur" hag e brezhoneg e lavarer ar Ver Veur, ar Ver Vihan, ar Ver Ledan, hag all. Lavaret em eus e penn kentañ ar studiadennoù-mañ an diaester a oa evit gouzout pet anv e Gwer- a c'hell bezañ, en abeg ma ne ra ar skritur gallek kemm ebet etre G ha G', skrivet o-daou gu.

Evit an dour-red ez eo G'AZH ar ger pennañ, daoust ma 'z eo rouez e bro Mené (25 hepken er Mbh), e Treger, en enep, ez eo stank-tre (CdN 215 e-keñver 151 er Fin), marteze dre ma vez ivez graet "gwazh" er vro-se eus ar pezh a zo "poull" pe "lenn" el lec'hioù all. STER ha FROUD avat a zo rouesoc'h. Bez' e c'heller menegiñ ez eo deuet, e lec'hioù 'zo, roudou(z) pe roudour da dalvezout "gwazh". Talvoudegezh wirion ar ger-se eo avat: al lec'h ma 'z eus tu da dremen ur stêr pe ur wazh-dour bennak, hag un anv bennak o virout ar wrizienn Red a gaver c'hoazh ivez.

Marteze e c'hellan menegiñ, en abeg d'an traoù diboeall a zo bet lavaret diwar e benn, n'en deus ket doare ar ger BAN da vezañ bet implijet evit envel lec'h pe lec'h. Ar ger-se, ha ne deo ket gwall anavezet, a c'hell bezañ un anv galianek bet miret e brezhoneg, moarvat eo eñ a vez kavet en anvioù-lec'h gallek "Sagnes" hag er galleg lennegel "saignée", evit ur san graet da zizourañ an hent, da skouer.

STANK a zo ivez diaes a-walc'h gouzout an dalvoudegezh en devez el lec'hioù a zoug e anv. E departamant ar Finistère eo e kaver 270 eus an 391 anv an eus kavet. Gouzout a reer ez eus ur verb "stankañ" o talvezout kement ha "stoufañ" pe "lakaat harz", ha bez' e c'heller stankañ ouzh ar saout koulz ha stankañ ouzh an dour. E Kerne e talvez avat stank kement ha

"traonienn zon"; moarvat ez eo an dalvoudegezh-se eo a gaver en un anv evel ar stank meur e Dirinonn, hogen disheñvel e rank bezañ anv ar stankoù Koad er barrez nesañ, Loperchéd. E Treger en deus ar ger "stank" talvoudegezh "lenn" (diwar levezon ar galleg "étang"?), hag el levr Bilzig e c'heller lenn, diwar fent, evel just, "beuzet e stank ar vilin-avel".

LEUN ne vez ket kavet gwall alies da anv d'al lec'hioù annezet. Penn ar Yeun eo an hini stankañ eus an anvioù-se; hag an anv a vez skrivet ivez "Yun".

PALUD ha LOC'H a zo gerioù a gaver roet da anvioù-lec'h e kichen ar mor. Al lec'h brudetañ o tougen an anv kentañ eo Santez Anna ar Palud, er Porze. Meur a g'kerloc'h a gaver ivez e Goueled Kerne, ha krediñ a c'heller ez eo ivez "loc'h" eo a gaver e penn anvioù evel Lodonneg (Loktudi), Lonevri Kerlaz pe Lomergad Argol.

Anvioù lec'hioù ar mor hag an arvor a dalvezfe ur studia-denn hir evito o-unan, hag al labour a zo bet prientet-mat e-doug an ugent vloaz diwezhañ gant an enklaskoù kaset da benn evit mererezh ar c'hartenniñ, dreist-holl gant Alan W. ar Berr. Ne venegin nemet ar ger BEN a gaver el lec'h m'en em daol ar stêrioù er mor bras. Al lec'h brudetañ o tougen ur seurt anv eo Bened; ur barrez all eo Binig (an anv Ig-se a c'hellfe bezañ ivez eil lodenn anv ar barrez a vez skrivet "Pordic" war ar c'hartenoù, hag a c'hellfe kentoc'h bezañ Porzh Ig eget "porzhig"; ha sur a-walc'h e vez kavet ivez en anv "Lantic", a vefe neuze "Nant Ig" kentoc'h eget un anv o kregiñ gant Lann-). Ar ger NANT-se, ken stank e Kembre, en deus doare da vezañ rouez-tre e Breizh.

An anvioù o tennañ d'an natur ha d'ar gounid-douar

Da heul Koad, hag a zo a-bell an hini stankañ, e teu Park ha Prad (war-dro 450 pep hini evit an tri departamant). War-lerc'h diouzhtu e teu Koumanant (troet e "Convenant"), hag a zo eus ar stankañ e Treger, ha rouez e lec'h all, ha neuze Maez (skrivet peurvuiañ kes-). Da heul e teu Rest, met petra eo talvoudegezh an anv-se a chom arvarus a-walc'h. Mar deo kes ur ger eus ar goueled pellañ (294 war 366 er Fin ha 9 hepken er Mbh) ez eo Rest stankoc'h e daou zepartamant ar reter. Ha GWARLEK a zo ivez un anv eus ar Goueled ha troet e vez meur a wech gant "Garenne". Ur ger germanek eo hag en devije talvezet da gentañ, hervez, kement ha lec'h da virout loened, met e Goueled Breizh e vez graet gantañ bremañ evit ul lanneg a vez labourret gwech ha gwech all, ha gant an dalvoudegezh-se eo moarvat eo deuet da vezañ stank evit envel al lec'hioù annezet, ar pezh hel laka e rumad Park ha Prad. Ouzh e dalvoudegezh orin e c'heller tostaat hini GARZH hag a gaver 41 gwech er Fin ha 32 gwech er CdN (hep kentañ anvioù evel Penn ar C'harzh pe Boharzh, Koad ar C'harzh, hag all); diwar ar ger-se eo bet savet an anv Buarzh pe Buarzh, hag a oa eta ur c'hloz da virout saout (bioù). Diwar ar ger-se ivez e teu an anv Liorzh, hag a zo eñ, o tennañ d'ar plant ha neket d'al loened.

HAË a zo ivez moarvat ur ger germanek, hag e dalvoudegezh a zo moarvat hini "garzh". Koad an Haë (Koad an Haë e Leon) a vije eta kendalvoud gant "Koad ar C'harzh".

Meur a anv e Leur, Leure ha Leurge(u)r a gaver ivez, koulz hag e Krann, talvoudegezh an anv-mañ chomet ivez arvarus a-walc'h betek-hen.

Gwashoc'h ez eo c'hoazh evit ar rummad KEL, KILL, pe KILLI ha GILLI. Bez' ez eus div barrez a vez skrivet o anv "Guily", div all, hep kontañ meur a lec'h all, hag a vez skrivet o hini "Quilliou" pe "Quillio", ha "quillien" a zo stank ivez. An diaester kentañ eo eta gouzout pe ez eo Kili ar ger-diazez pe ez eo Killi, pe zoken an daou. Tud a zo avat anvet "Guilly" ivez, ar pezh a c'hellje mont gant "killi" mar deo hemañ ur ger gwregel. Un anv evel Traongilli a c'hellje bezañ eta komprenet evel traoñ (an den anvet) Gilli, pe neuze gilli an traoñ, a rofe ur ger "gilli" disheñvel !

E brezhoneg bremañ e kaver ur ger kel, o talvezout tost da vat "kombod", hag a c'hellje aes a-walc'h reiñ "kili" el lies-ter, koulz ha ma c'hellje kael reiñ ivez ; hemañ avat a zo gwregel tra m'eo gourel an hini all. Met bez' e kaver ivez er geriadurioù ur ger all kell, gwregel, hag a zeuje, eñ, diwar al latin "cella", hemañ o c'hellout ivez bezañ "killi" pa vez lies. Bez' e kaver ivez e kembraeg ur ger "celli" o talvezout kement ha koadig pe brouskoad, hennezh a c'hellje ivez bezañ "killi" e brezhoneg. Ha "killien" liester an anv-se ?

KEL latin a c'hellje nat a-walc'h displegañ an anvioù o kregiñ gant Kel- (skrivet ivez alies "quel-"). Anavezet eo ar ger-se e galleg (Celle) hag implijet kaer e vez ivez ar stumm kevatal e gouezeleg ("Kilkenny" en doare skrivañ saoznek, da skouer). Un tamm e pep lec'h e vez kavet an anvioù o kregiñ gant Kel-, met stankoc'h int kalz en arvor Leon ha Kerne. Setu hiniennoù eus an anvioù-se : Kelared e Pontekroaz, Lanneuvred ha Lilizag, Kelarn e Porneleg, Kelarneg e Floeneg ha Kelarnig e Pluguvan, Kelarnou er Vourc'h Tenn, Kelarnu e Gwiler hag e Triegad, Keldreg e Flozeved, Keldren e Landudeg, Kelodern e Gwiler, Gwiklann, Flourin Treger, Rosporden, Logeginer, Flouneour ha Flougoñvelen, Keler en Argol, Goulc'hen, Lanneuvred, an Treoù, Kelenneg en Argol, Floudiern, Lokmaria Plouzane, Kelened e Landunvez, Kelerou e Flozeved ha Gourlizon, Kelern e Roskañvel, Flourin Treger ha Treogad, Kelarnou e Gwipavaz, Kelorned en Eskevien ha Trepenneg, Kelornou e Gwinevez Lo-krist ha Penmarc'h, Kelvi e Gouezeg...

Ret eo teuler evezh avat e kaver en holl anvioù-se, nemet an hini diwezhañ, ur R en eil lodenn, ha gouzout a reer pegen diaes e vez da zaou R (hag ivez da zaou L pe da zaou N) chom an eil e-kichen egile, hag unan anezho a vez techet da vont da L. Setu ma vije tu ivez ne vije Kel- en anvioù-se nemet un distummadur eus KEL-, daoust ma 'z eo ar ger diwezhañ-mañ ken anavezet ma 'z eo diaes dezhañ kemm. Evit bezañ sur e vije ret eta kaout testenioù kozh eus an anv. Kement-se a zo avat o tiskouez pegement a labour enklask a zo c'hoazh da gas da benn evit an neb en em gaffe douget d'ar studi.

A-barzh klozañ e vo nat din marteze menegiñ ivez ur rummad all a anvioù o tont diwar anvioù gwez pe blant all. Savet e vez an anvioù-se en ur stagañ un dibenn ouzh an anv gwez. An hini pouezusañ eus an anvioù-se avat, o vezañ ma vez douget bremañ gant peder farrez, n'eo ket a orin vrezhonek, hogen a zeu diwar al latin. Div eus ar parrezioù-se a zo e Treger :

Feurid ar Roc'h ha Pañvrid ar Beskont, div all e Kerne : Purid Kintin ha Purid Flogastell ; ur pempet a gaver ivez e bro Bentevr : "Lommeret" hervez ar skritur gallek. An anv brezhonek tostañ d'an anv orin a vije "Feurid". Un anv brezhonek ken-daivoud a vez kavet ivez avat, avalloù an hini eo, hag evit ar pezh a sell ar yezh e ranker teuler evezh ne deo ket savet diwar "aval", hogen diwar "avall", un tammig disheñvel.

Meur a anv en -ID a gaver. Unan all a zeu ivez diwar anv ur blantenn bet ledet dre amañ, hervez, gant ar Romaned, ar beuz, ha Beuzid eo an anv-se, bet douget gwechall gant parrez Beuzid Ronogan, teuzet bremañ e Landerne. Kistinid a zo anv ur barrez a vro bened, ha moarvat ivez hini ar barrez a vro Sant Brieg a vez skrivet an anv anezhi "Quintenic" (anv hini Gwened a vez skrivet ivez "Quistic" e galleg). Kavout a reer ivez meur a Skivid (skav), Belerid (beler), Kerizid (kerrez), Spernid, Dreizid, Drenid...

War skouer avalloù e kaver ivez meur a anv en -OD (a gaver ivez dindan ar stumm -ped, -oued pe -ed). Kolloù eo marteze an hini stankañ anezho, "koll" o vezañ gwizienn hor ger kel-vez (koll+gwez). Tannoù a zo anavezet nat ivez ha souezhus eo gwelout ez eo ar ger "tann" ha nalet "derv" eo an deus roet ar muiañ anvioù-lec'h (anv parrez "Quessoy", e bro Sant Brieg a virfe un anv all evit an derv, ha marteze eo vefe kavet ar ger-se ivez en un nebeud anvioù all eus ar vro c'hallou ; anv ar barrez, brezhonekaet, a c'hellfe bezañ eta "Kesod"). Bez' e kaver c'hoazh Onnod, Skaved pe kaoued, Spernod. War "faou" ez eo bet savet an anv Faoued, tra ma kaver ur rummad ledanoc'h o tont diwar "fav" : Favod ha Faved.

Ur rummad bras a anvioù a zo savet diwar an dibenn -IG a zo bet anv anezhañ d'agent evit ar pezh a sell an anvioù-tud : Kelenneg, Kelvezeg, Balaneg, Ianneg, Kadeneg, Dreneg, Brezeg, Gwineg, hag all. Hiniennoù a vez ivez en -ENNañ evel Favenneg pe avalenneg.


PENNAD KLIZAR

Danvez ar skrid-mañ a zo bet displeget evit ar wech kentañ dirak tud Kmp Brekeltiek ar Vrezhonegerien, e Pontekroaz, d'ar merc'her 7 a viz Eost 1974.

Anat eo e oa bet ret skañvaat an danvez evit na vije ket bet re hir an displegadenn ; hag ar gomz a dalvezas dreist pep tra da zisplegañ talvoudegezh ar c'hwec'h kartenn vras a oa bet savet er skeul 1 : 200 000 ha bet lakaet eno dirak daoulagad ar selaouerien. Evit an embann en HCR YLH em eus bet c'hoant da reiñ ar skrid en e bezh, met ret eo bet din biha-naat ment ar c'hartennoù betek 1 : 500 000 ha lakaat arouezioù hepken e-lec'h al livioù a oa war ar c'hartennoù kentañ.

Diskouezet e oa bet ivez d'an dud, e Pontekroaz, ur gartenn all, er skeul 1 : 50 000 eus mervent Kerne, o c'holo, n'eo ket hepken parrezioù ar C'hab, met ivez re ar Forze, re ar vro vigoudeñ hag un darn eus bro Gemper. Re labourus, ha re vizus ivez, e vije bet adsevel ar pezh labour-se evit an embann. D'an neb a garo eta, da bourchas ar c'hartennoù ret ha da glask an anvioù a zo anv anezho er skrid-mañ.

(3 a viz Du 1974)




Kartenn II

PARREZIOU ha TRENDIOU KOZH

gant	TRE, LANN, BOD, KER			
	TRE	LANN	BOD	KER
(An anv) parrez c'hil n'eo ket un d'arrog n'eo ket un anv-korreadh a ruzig gant ar stroligenneg	☐	☐	☐	☐
- Ar anv a g'rog gant ar ger "merget"	☐	☐	☐	☐
- "livodigenn" ar ruz a zo savet	☐	☐	☐	☐
- An anv a g'rog gant ar ger "merget" (ar ruz a zo savet da goll)	☐	☐	☐	☐
- Ar ger "livodigenn" a zo bet dibezet eto	☐	☐	☐	☐
- Ar ger "merget" a zo oad-tan an anv	☐	☐	☐	☐
- "Hefev", met ar ruz n'eo ket a g'rog	☐	☐	☐	☐
- An anv a g'rog gant ar ger "merget"	☐	☐	☐	☐

Kilometradeg 1:500,000

WWW.IFREMER.BREIZH



Kartenn IV

PARREZODD HA TREVIDI KOZH E LOK


- Anv o kregih gant/ Serviliñ dizeñt'ero
- Lesere Anv alle o LOK a-haer ar serviliñ pe ar vevad (anv evel ar gant)
- ⊙ Taboullidigezh ar vevad

ANVDOU A BEP SEURT

	BOURCH	LEP	MAS	TRELL	ROC'H	DIN	KAMP	KAM.
- anv o kregih gant/	●	●	●	●	●	●	●	●
- anv evel ar gant/	●	●	●	●	●	●	●	●
- anv ar vevad	●	●	●	●	●	●	●	●
- serviliñ dizeñt'ero	●	●	●	●	●	●	●	●
- ar vevad	●	●	●	●	●	●	●	●

1 : 500 000


1978-1982



Kartenn V
 PAREZIOU HA TREC'HO
 o tougen anvioù a bep seurt (1)

—	-lliz	☐	"Montreuil"
▲	Mouster, -vouster	☐	"Montoir", "Mouier"
★	-rain	☐	Koad- (arvenez)
✱	Koad- , -goad	☐	Kil-, kil-, -kell-
◆	-goad (goad LANH., KEE.)	☐	-borzh
●	Kil-, kil-, -gill	☐	-boul (goad pub., nec.)
○	Ponl-, -bont		
▲	Perzh-, Perzh-		
▲	Poull-, -poull		

1:500 000
 Kilometroù
 METRE
 1 2 3 4 5 6 7 8 9 10 11 12 13 14 15 16 17 18 19 20 21 22 23 24 25 26 27 28 29 30 31 32 33 34 35 36 37 38 39 40 41 42 43 44 45 46 47 48 49 50 51 52 53 54 55 56 57 58 59 60 61 62 63 64 65 66 67 68 69 70 71 72 73 74 75 76 77 78 79 80 81 82 83 84 85 86 87 88 89 90 91 92 93 94 95 96 97 98 99 100



Kartenn VI
PARREZIOU ha TREC'U
o touden anvioù a bep seurt (2)

■ Breizh	◼ Breizh (inverted)
■ Ros-Roz	▲ Ben
■ Ruz-Ruz	◼ Penn
■ Lin	▲ Mont
■ Menez	◼ Mont (inverted)
■ Gwerin	▲ Gwerin
■ Gwerin	◼ Gwerin (inverted)

Ar parrezioù a-bep-seurt-se a-raozañ ar c'hêr ha parrezioù
 1:500 000
 Kilometradeg

Tri departamant Gouelei Breizh

NIVER AN INVICU-LEC'H
(er-maez eus ar boure'hiou)
hervez rolloù INSEE Roazhon

URLH	ANV (distag, pe rann gentañ an anv)	EN	ECLL	FIN	C d N	MBN			
: 1	Kêr	: 16	180	: 9	365	: 4	330	: 2	75
: 2	Penn	: 2	227	1	342		540		345
: 3	"Loulin", Milin, Meilh	: 1	797		811		533		453
	"Loulin"	: 1	730		751		524		452
	Meilh	: 12			38		4		0
	Milin, Melin	: 25			19		5		1
: 4	Ti	: 1	421	1	665		256		100
: 5	Font	: 1	258		470		357		331
: 6	Koad	: 1	114		505		315		294
: 7	Lann (hep "Lande")	: 1	978		446		392		140
: 8	Poull	: 1	40		400		393		147
: 9	Forzh (+ "orte")	: 1	213		197		436		184
: 10	Tre	: 1	796		365		131		200
: 10	Traou, Traou-, Tro-	: 1	716		315		284		136
: 12	"Croix"	: 1	785		161		455		169
	gant Kroz	: 1	076		354		338		183
	+ gant "Croissant"	: 1	213		461		361		187
: 13	Bod	: 1	689		150		185		354
: 14	Benez	: 1	671		371		45		255
: 15	Lez	: 1	645		365		138		143
: 16	Ru (+ "Rue")	: 1	602		199		355		48
: 17	Krec'h	: 1	589		213		351		24
	gant Renec'h	: 1	673		236		352		45
	+ gant Kre-	: 1	760		259		448		73
: 18	Gwern (kv ivez Gwer-)	: 1	489		183		144		152
: 19	Toull	: 1	477		213		144		120
: 20	Roz	: 1	462		242		107		113
: 21	Fark	: 1	451		206		141		104
: 22	Prad	: 1	446		254		119		73
: 23	"Convenant"	: 1	29		39		330		0
: 24	Bre(n)-, Bri-, Bron-	: 1	393		112		50		231
: 25	Stank	: 1	361		270		30		71
: 26	Gwazh	: 1	371		151		215		25
: 27	Maez	: 1	366		294		63		9
: 28	Rest	: 1	341		129		108		109
: 29	Run	: 1	328		153		137		38
	gant Ru	: 1	930		352		452		86
: 30	ar Goshker	: 1	312		153		75		84
: 31	Kroz (kv ivez "Croix")	: 1	291		193		83		14
: 32	Roc'h (+ "Roc")	: 1	239		141		70		38
: 33	Lok-	: 1	241		76		49		116
: 34	(Bel-air)	: 1	209		49		100		60
: 35	(Croissant)	: 1	159		107		28		4
: 36	Kar- (kv gant Ker-)	: 1	137		0		78		59
: ---	Gwaremm	: 1	137		114		9		3
	gant "Garenne"	: 1	260		162		66		29

Niver an anvioù-lec'h (kendalc'h)

URZH	ANV	LN	HLL	FIN	CaN	MBH
38	Loch (+ "Loge")	124	71	35	20	
39	"Garenne"	123	28	59	26	
40	Kel- + Kal-	122	78	15	30	
41	Keli, Mili, Killi... gant Gilli	121	71	35	15	
42	Kastell (nep "Château")	120	62	40	16	
43	Maen	119	75	24	15	
44	Lin (kv <u>Lein</u>)	112	54	18	38	
45	Hae, "Haie", "Haye"	107	20	47	37	
--	Kre (kv <u>Krec'h</u>)	107	23	56	28	
--	Gwer (kv <u>Gvern</u>) diglok	...	94	
48	Lein gant Lin	94	45	34	15	
49	Feunteun (nep "Fontaine")	206	99	52	53	
--	Louster	87	51	22	14	
51	Kenech'h (kv <u>Krec'h</u>)	87	36	7	46	
52	Kenkiz	85	23	41	21	
53	Magor, Moger	81	35	35	11	
54	Lec'h	80	32	19	29	
55	Garzh	75	2	37	36	
56	Roudou(z), Roudour	73	41	32	0	
57	Leur (kv <u>Leure</u>)	70	28	33	9	
58	Maeziou (kv <u>Maez</u>)	64	43	0	21	
59	Krann	47	30	17	0	
60	Luz (kv <u>Lez</u>)	46	17	8	21	
61	Rann	45	19	12	14	
--	Stêr	44	16	11	16	
63	Lenn	44	34	0	10	
--	Palud	42	20	4	17	
--	Meilh (kv <u>Milin</u>)	42	33	2	7	
--	Karbond	42	38	4	0	
67	Kelenneg	42	24	16	2	
--	Beuzid + Beuzidell,... gant "Boissière"	39	15	8	16	
69	Kam-	39	24	16	2	
70	Kab	44				
71	Ple-, Flo-, Flu-,...	38	11	17	10	
72	Leure + Leurgeur	36	9	12	15	
73	Gilli (kv <u>Killi</u>)	33	13	13	7	
74	Kistillig	31	27	2	2	
75	Straed	30	23	3	4	
76	Milin, Melin	28	20	4	4	
77	Hellez	27	27	0	0	
78	Kozhkastell	25	19	5	1	
--	Kleger, -an, -eg	24	15	4	5	
80	Henger	22	16	6	0	
81	Ben-	22	15	6	1	
--	Stivell	21	14	4	3	
83	Krugell	19	8	5	6	
84	Froud	19	11	6	2	
--	Mur, Muriou	18	11	4	3	
--	Leti(ez)	17	12	2	3	
--	Leurvaen	17	8	9	0	
88	Lengleuz	17	14	9	0	
89	Liorzh	17	6	8	0	
--	Goariva(n)	16	15	1	0	
		13	11	1	0	
		13	10	2	1	

J o r j B E L Z

"EN DEVOUT" é PLOUHARNEL

- Studiadenñ verr -

(Notenn : ar skritur a zo fonetek ha n'eo ket fonemek)

Amzer-vremañ

I	am as (guéhavé /m as)	em es
	i es	eh es
	en des	en des
	i des	hé des
	en es	hun es
	e wes	e hues
	u des	ou des
	Un aval em es	in a'va:l 'am es
	M'em es un aval	
	M'es un aval	
II	1 mambwarä (mi)	Mem bout e hran (mé)
	2 tapwares (ti)	t'ha pout e hres (té)
	3 ndava:ra (jã)	en devout e hra (éan) [en davwara
	idava:ra (jãj)	hé devout e hra (hi) i davwara]
	1' arbwarem (nãj)	hur bout e hrant (ni)
	2' upware (uãj)	ho pout e hret (hui)
	3' udava:rã (in)	ou devout e hrant (int)[u davwarã]
	Mem bout e hran un aval	mambwarä in ava:l
	t'ha pout e hrer amzër ?	tapwares amzi:r ?
	hur bout e hrant-ni chistr'en ti	arbwarem nãj [i]str in tãj
	hé devout e hra 10 vlé ha 60	i dave:ra deg vle a tri wa:en
a)	Berreit vé en treù a pe gomzër :	
	Gwarä	'Boud e hran
	'pwares	poud e hres

b) E Plouharnel é implijér ur lochad er stummeù :

Mem bout e hram (mé)
t'ha pout e hres (té)
hur bout e hramb (ni)
ho pout e hret (hui)

Muich-mui é-leh keméret "en devout e hra"
hé " " "
ou " e hramt

e vé groeit get "éan des éan
hi des hi
ou des int"

E [pli:'qir] (Ploëmel) e vé kleuet liaesoh
"En devout e hra hi ..."

E mar a leh (Landaol) m'es kleuet :
[andavwara] en devout e hra
en devout e hres ...

III Stumm gourdon

am bi [mam bi
a pi ta pi]
an davi
i davi
ar bi
u pi
u davi

Pep plé m'em bé me zereù-mat [Pæmple mambi ma zerau ma
Ablén en devé é goutell geton able:n an davi e gutel
getä

Amzer am-dreménet

1) am bwe em boé
a pwe ha poé
an dawe en devoé
i dawe hé devoé
ar bwe hur boé
u pwe ho poé
u dawe ou devoé

- Tud zo e lar [an dwe, i dwe ...] mès er ster ne gemm ket.

- Barh é Pli:'qir (Ploëmel) m'es kleuet "u davwen"

Mam bwe in ava:l m'em boé un aval
Jn dawe grwaj an dra^s/_z an Ind 'devoé groeit en dra-sé

an dra^s/_z an u dawe grwaj En dra-sé ou devoé groeit
Patra u davwen a be - Petra ou devoent a bé (Ploëmel)
(dawen)

2) Stumm-duéh

am bazi em bezé
a pezi ha pezé
an davazi en devezé
i davazi hé devezé
ar bi hur bé
u pi ho pé
u davazi ou devezé

Nezé, en dud en devezé irquid de nrz:
Nazan en dyd an davazi irwi danu:z

M'em bezé amzér agent : mam bazi amzir a jen

Amzer de zonet

em bo am bu
ha po a pu
en devo an davi
hi devo i davi
hur bo ar bu
ho po u pu
ou devo u davi

Deare divizout

em behé am bi
ha pehé a pi
en devehé an davi
hi devehé i davi
hur behé an bi
ho pehé u pi
ou devehé u davi

(Cf. er stumm gourdon)

Get er stumm amzér mañ é implijér lies erhoalh "bet"

P'em behé gouiet = P'em behé bet gouiet
[Pam bi gujet = pam bi ba gujet]

Amzér dreménet : get "bet"

1) - m'es bet, m'em boé bet ha rah ...

2) Laret vé mar a hueh "Mem bout e hran bet en dra-sé"
 Mem bu a rã ba en dra^s/₂ en

Sallet petra ho pout e hret hui groeit
 Sallet petra u pw a ra yój grwaj

Groeit em bout e hran 2 leù ar droed
 Grwaj em bw a rã day ljaw ar drue

"bet" vé keméret aveit displég un dra el treménet :
 n'hun es bet deverret én amzér agent =
 n'hun es deverret (mès achiù é !)

Anù-verb

: frank en implij e vé groeit geten

- a)- en devout Koutant on en devout un aval
 Kut ã we^h an davu in ava:l
 e oé red dehé en devout bet un sovét
 i we rate andavu bãm sovét
 Ind e dosté d'en devout soubenn
 Jin a dwa^ti den davu sabén
- Bout Oé red d'ein (m) bout bet arrested get me jaw
 wert^o m bu ba are^ta ga ma zo
 Mar fact d'ha bout aveleù (= en devout aveleù)
 Mar fact a bu avalau
- Kavouit nerh e oé red kavouit dehé
 [a we re kavwite]

b) Tu vé de laret "Koutant on (en) devout éan guelet"
 més eué (liaesigoh) :
 "Koutant on mar em es éan guelet"

"En devout" get er gér réner

Me zad ha me mamm en devoé laret
 Er ré-zé en des tiér

Me zad ha me mamm 'devoé ket laret
 Er ré-zé 'devoé ket ti erbet.

)c(

Jorj BELZ

GUERZOUR MOD-KOUH ...

Guiù é lagad édan é vonnet labourer-douar, herrus ha sioul
 a imur ar-un-dro, éma Pier Thomas é viheïn didrouz ket pell a zoh
 borh Plénuér, parrez é-leh m'En deus treménet lod brasan é vuhédigèh.
 E blijadur : seùel soñnenneu hag o displég é kement tolpadenn e vé,
 dirag é genvroiz hamet dehon. E ruchennaat oé, er huéh ketan ma
 on ceit devadon. Hoari e hré é zehorn g'er plouz, d'o handennein
 ha gobér anché panèrièù, sort ré 'vezé bet lakeit er gran de hoarn
 énné, un amzér zo bet, modet bras hiniù-en-dé eit kinnig fréhaj ha
 rah.

Gañnet get er hantvléad mañ, éma bremañ Pier Thomas é
 tishuéh, goudé bout bet pell amzér é terhel tachenn. Amzér dehon
 ne vanké ket eit kleùet boèh en treù é tiviz ér bed tro-ha-tro...
 amzér ha léh de vécin é hirieù ha d'o hampenn d'é sonj ne oé ket.
 Un dé é strinkas neoah er hetan poz-kan ér-maz ha "nitra d'obér
 aveit parraat" e laro Pier Thomas 'ean-mém deuéhatoh. Ur huéh
 kouéhet en ton én é benn é oé bet red dehon lokel er homzeù de rio-
 lennein, betag ken e vehé bet disannet wat é galon, perchanj.

Ur soñnen a zivoud er brezél é : "ré a araj em boé doh en
 Alamané e oé é torimellaat dré-mañ eit chom mud dohté, ha mé laré :
 me soñnen e zeï de vout ur huirioné, de ket possibl... Oen é tran-
 chal aveleù-douar er mitin-sé, er blé 1941, ne oen ket bet pell geti !
 Goudé er brezél, hé hampennet em eus kalz pé vihannoh ha staget doh
 hé lost er pozieù deuehan a vezul ma kerhé en treù..."

I a Ziar er brezél

Cheledet mem bredér, o na péh un dason
Zo kouéhet ar en douar er blé nañ ha tregont

Pe oé en dud ér bed é viñein ken trankil
Hitlér en Antekrist zisklérias er brezil (I)

En dud ag hur bro-ni laré dran⁽²⁾ er gouiañ
"Er viktoér er huéh-mañ e vo hoah d'en argant"

En eur hag en argant ne talheint ket armaj
En Aleman kruél p'um lako én araj

Chetu en amzér gaer, darriù⁽³⁾ en neué hañ
Hitler e gri abenn : Soudarded "en Avant" !

Er Frans hag er Beljik, o deñ oé bet flastret
En Angleter um sôv, 'r viktoér de ket kollet

Ur jeneral ag hur bro devoé treuzet er mor
'Vonet d'en Angleter eit sovein en inour

Fransizion mem bredér, chomet kalm ar ho treid
Benn er bleieù ma za vo ranjennet er blei

Épad en amzér trist ma viuamb ér bed
Hitler e gri atañ el un diaul arajet

Tout en dud ag er bed é vo red dehé plépein
Er stired ag en néan vo én dangér brasan

Hitler get é orgueil e ias mêm ér Russi
Ean zas éndro ar gul ha fondet mat é fri !

Fransizion mem bredér, ne gollet ket kouraj
Er blei barh én toull-drap e grevo én araj

En auél e chanj tu hag er mor kounnaret...
Hag armeieù Hitler 'r huéh-mañ e zo brizet

Pen das en Amerik aveit douarein é Frans
e laras rah d'en dud : kouraj hag espérans !

- (I) - brezél (distilhet "brezil" g'en "Arvorizion")
(2) - dran = épad (ag er galleg)
(3) - darriù = arriù

Ché enta deit er soñnen get men dén. Er mizieù arlerh é oé a
vég de végé obér tro er barrez ; ur blé arlerh é oé anauet mat
rah dré er hornad-bro. Un dén arall a Blenuér, Pier Thomas é hanù
eué, ha éan eué sonnour brudet hé sonnè par ma hellé, é kement tachad
e oé ! Tregont vlé goudé é hell boud obérénn er peizant-sé ag hur
bro ur shuir eit diskoein er peh e sonjé ul lod-kaer ag er Vreihiz
- ré er bobl - ardro er prantadeù-hont.

Devéet er brezél, deit amzérieù arall, ur vuhé arall é
toeh en dud. Kenderhel e hras P. Thomas g'é labour pamiég. Ne vezé
ket red er pedein eit digas ur poz-son bennak ér-maez... azé oé
é galon, el man dé atañ, é gwirioné. "Guerzenné tud é vro" e zé
geton nezé, a bep sort anché, adal "l'ami Mandal" dizertour é
pennin doh arméieù Paris, betag istoér er héh peizant é soublein
é benn doh un Etru digor-kaer é hrabaneù, eit draillein er peur-
kéh sel-guéh goahoh...

A houdé un nebeud bléieù en des P. Thomas lakeit é sonj
arré é seuel soñnenneù : en treù ag er vuhé pamiég dreist-holl e
blij dehon. En dud é vonet ar er loér : ché azé dañé ur soñnen :
ne dalv ket er boén monet de glah pell en aùen ; just el guerzenné
koh Breizh, ijinet a ziar rah kement tra e hellé bamein en dud,
ré el labourér-douar e zo tostig tra d'er péh e huél, e gleù, e
sonj-éan bamé én é barrézig a Blenuér : gwélet kentoh !

II Ar er loér

A pe oen-mé bihan, é ti me zad é kreskein
A pe sellemb de noz doh er loér é splannein...

A pe sellemb de noz doh er loér é splannein
Hun deulegad e oé souéhet, nitra 'gomprénemb ket

Hun deulegad e oé souéhet : nitra 'gomprénemb ket
Più en devehé jamez kredet ^{r/}arnehon vehé bet krapet

Più en devehé jamez kredet arnehon vehé bet krapet
En dud abil ag er bed neoah en deus gelllet

En dud abil ag er bed neoah en deus gelllet
G'o machinieù souéhus arnehon zo dichennet

G'o machinieù souéhus arnehon zo dichennet
Amstrong é tichenn arnehon e oé chomet bamet

Amstrong é tichenn arnehon e oé chomet bamet
Gwélet ur vro ker yen hag hemb buhé erbet

Gwélet ur vro ker yen hag hemb buhé erbet :
Gwell é hoah bout ar zouar eit ar er loér skornet !

Komzet zo bet un troh a dud nuah en Ardeuen kours-ahoé
dré-sé. Deù béh feintus deit, Doué oér a beban, em es bet en tu a
gledet betag amañ. Pier Thomas en deus eué é boz de gizellein a
zivoud é voisined ha, m'en assur deoh, deverret zo bet é Plennér
diar-goust en dud nuah-sé : "bandennad tuchentil... é tiskocin o
begil" el ma sonnér éno !

III Liar en "dud nuah" ag en Ardeuen

Farrez en Ardeuen zo bro er bitaoded (I)
Neoah vé kavet éno tud hemb lavreg na roched...

Tud e gousk é lanneg, ya d'er mor de houlinket
Hemb devout jamez eun bout débret d'er hangred

N' Lutru m'er deus gouiet, éan des int gourdrouzet
Dihuenet é goulinket mar'hues ket ho vraget :

Tribunal en Orient, azé éma jujet :
Azé zo laret dehé : ma rod kuh er jéjé !

(I) - pitaod = piriuk

Mar dé en "dud nuah" meit ur bourd de zigarg eit gobér goep
ag en Ardeuiniz, é kontrel, get istoér Nasser e iamb pelloh aveit
bro er "penneù Karott". Chetu bout é berr-girieù doérisiù a
ziabell ! Tallein e hra, el-just, displegadenn en treù-digoéhet
er péh e dall, ha nitra kin... Neoah, kontet é brauig ; santet vé
er peizant é tarhein é fouet, é ansé ijinein sonjeù Dayan kerkloüs
el ré Nasser, é ansé lakaat buhé én é gontadenn n'ur huchal ar
hennen... hemb ankoéhat Kain ha Abel é gatechia, el man dé deliet.

IV Sofnen Nasser

A houdé er homans ag er bed
Bro Israel oé treboulet

Hag atañ en treù ne chanj ket
Ker er brezél né achiù ket

Nasser faot dahon distruj Israel
El men doé groeit Kain ha Abel

Més oeit Dayan ha dihouket
Hag é droed-fouet deus keméret

"Etru Nasser, petra glaskes-to
'E klah okup mem bro-mé"

A pe darhas Dayan é fouet...
Soudarded Nasser é rideg

Ridet o deus bedig er hoah
Hag abarh é saillant rah

Etru Nasser e zo spontet
Ar en taol 'deus démisiofet

Lutru Nasser, barties ket
Petremant omb-ni rah kollet !

Bout deit ar en oed ne barra ket doh Pier Tomas a dural
ur sell perhuéh ar en digoéhieu e vé én hur bro, é kontrel zoken.
Ne dalv ket er boén bout skoleit mat eit spurmantein dezonet Breizh
abenn un nebeud bliéiu, mar talh en treù el man dint bremañ atañ.
Petra e huél ketan : "er vro é vonet a dammeù", chaket dé arlerh
dé : ha komprenabl vé, mar un lakér én é leh, éan, ur peizant ag
en des béhet hed é vuhé ar zouareù er vro, el men doé groeit é dud
én e raog : ne oé ket sur-erhoalh eit o guélet é téheïn a-rack, hag
étré dehorn piñ ! azé éma' en dalh ! Ur vrah a soñnen, kani en
douristed é tonet tré a-zoh hur pobl-ni, get troieù-lavar klei er
ré ne ouiant nameit sentein ha soubleïn o venn d'en dianvezerion,
hemb biskoah kredeïn shopeïn frank o sonjeù abarh é faseù o
maherion...

En douristed

Tud yeuvank, mar me cheleuet
Ne laro deoh on chagrinet
Gwélet er vro 'mont a dammeù
e oé neoah treù hun tadeù
N' douristed, p'arriuant ér vro
e gonans sellet tro ha tro
Na guerhet d'amb ho kuléieu
E oh enné just el léieu

En dud-sen en des cheleuet
O kuléieu o des guerhet
Laket int bremañ ér musé :
Hui béo eit sellet dohté

En douristed ar en henteù
Sell émen gobér afériéù
El laneg-sen e blij bras d'eïn
Dalhmat é helleïn er préneïn

A dra-sur, geou, m'er préno
é rein eiton er pêh facto
Ne sauei arnehon un ti
Ha biruikin e vo m'hani

Tachenneù kouh blij hoah bras dehé
Aveit o gobér a neué
Ellesen a nebeudigeù,
Ind e iei mem barh én douareù

Péh zo moian e vo prénet
Ker en argant ne vankant ket
Hag ellesen, hui, Bretoned
véet dirijet g'en douristed

Bretoned, hui ho po ké
Bout guerhet rah ho touar elsé
Goarnet int d'ho pugalégeù
El men devoé groeit ho tadeù...

Goulet e hra eue Pier Thomas monet tré betag er pèh e fall dehon brudein, hemb Kamdroienn erbet. Kañsein e hra é gredenn, é huirioné-ean, ha éan ker pell a-zoh el livreù omb-ni goalhet geté ré lies. Poén en deus bet en dén kouh é achiù get er huerzenn-deuñhan-mañ. Ne oé ket ma oé shuéh, na nuich ma oé deit é voéh de vout reùet. Nann. E huerzenn-éan é-unan oé, ha peb gir anchi e zigasé én é zeulegad el ul luhedenn a yeuankiz...

V D'en neué-hañ

D'en neué-hañ a pe gleüan
Er goukou é kañsein,
Nezé é komans me halon,
é komans um réjoeissein

Mar vé argant barh é me yalh
Durant er blé m'em bo men goalh
Monet de évet ur huéh gwinn
Donet d'er gér en ur soñsein

Kleüet er goahieù é trouzal
é kas en deur doh en deval
Er boketeù é tiskoein o fenn
Be zo ré ru, be zo ré gwenn

Gwélet er bléad é kreskein
hra hoah karg a blijadur d'ein
En deliaù é holsein er gwi (1)
er pouchined e gav abri (2)

El labourér én é barkeù
Doh o distroein g'é alèrieù
ér pratelleù er yeot e presk
ha loened vat e zo n'o mesk

Er bed-mañ zo gwell aveit mab-din (3)
Pep plé éan reneù é vin
Ha mé, peurkèh dén é kohaat
Ne hellan nu gobêr min vat

P'hellein ket mu chom é me sau
Mé chouko⁽⁴⁾ ha soñno atañ
Gwerzennè kaer me soñno
Gwerzennè tud a mem bro.

- (1) gwi = gwé
(2) pouchined = éned, laboused
(3) mab-din = mab-dén
(4) choukein = azésein

O ne oé ket kalz a dra marsé : un nebeud gwerzennè - ré er galon - staget d'er gwellan en eil doh e-ben. Ardran dehé é tizolen ur vuhé en hé véh, ur héh labourér kéh mahet én é bersoneleh, més é klah krouéein un dra braù ur sort. Goud e hren en doé gouhanùet hed é vuhé : ne ouié ket forh er galleg. Goud e hren reih mat el-dehon-éan ne oé ket jagouilh erbet kin é brehoneg ar ziveuz bugalé vihan é vro.

Perhuéh éhoan é cheleù dohton, tro ma oé er beligad soubenn é tivogedal ar er fornigell, hamet men dén d'unan yeuank deit devadon. Mé spurmanté ur galon ha n'antandé ket anchi sklasein, ur yeh ha venné ket anchi merùel, kohad tan deuñhan ar men en oéled.

Tostig-tra, bugalégeù Pleñuér oé é heari. Troeit oé en treù. Ne oemb ket mu én hur bro-ni.

J. BELZ
Skriuet é miz du 1973.

SKOL-VEUR BREIZH-UHEL
ROAZHON

Mezheven 1974

TESTENI STUDIOU KELTIEK

Ober an droidigezh :

GINIVELEZH 1914

Pa zeuis war an douar e voe dav mont da glask ar medisin. Un dispign a vefe bet dioueret brav gant ma c'herent, hag ouzhpenn, ma mamm a bakas un tammig mezh dre ma ne c'helle ket gwilioudiñ gant sikour nemetañ ar gomer gozh a dalveze da amiegez. Pa zegouezho ma c'hoar, ur bloavezh bennak diwezhatoc'h, ne vo ket graet kemend-all a reuz. Marijan ar Gow a guitaio, war-dro unnek eur, al lenn e-lec'h m' he doa dilouzet un dolzennad lienajoù. Kavet a raio nerzh a-walc'h da lakaat ar verenn war an tan a-raok ober gervel gant un amezegez ar gomer Marijan ar Rest a zieubo anezhi war-dro teir eur. Goude-se en em chalo gant he c'hreziou hag aet e vije d' o c'hlask ma vije bet lezet ganti hec'h-unan. Ne asanto chom da ziskuzhañ nemet paket ar garrigell gant un bennak ha degaset prim-ha-prim d' ar gêr an traoù chomet er prad hag a oa outo, war ar maen, un dismegañs ruz evit brud mestrez an ti ; ne lezer ket boud ul labour hanter-graet.

Donedigezh er bed-mañ ar c'hentañ bugel ma oan a ginnige bezañ un doare da nec'hiñ ar gomer gozh. Homañ, ur Frañseza eus Menez Fuez, ne fellas ket dezhi dont war-dro. Aliañ ' reas mont da glask ar medisin da Blogastell, ar penn-kanton, ouzhpenn ul lev hanter alese. Setu ma amprestas ma zad ur marc'h-houarn e rojoù leun da skarzhañ a-dreuz an noz hep tamm seurt gouloù ebet. Distreiñ a reas gant ur medisin, hemañ ivez war varc'h-houarn, nemet e oa gantañ ul lamp-karbur war e varrenn-sturial. Hag e tiskouezis ma fri hag ar rest hep ober re a ardoù, ouzhon ur poñsin mat, evit doare, nemet hep an disterañ gouenn ivin.

D' ar mintin war-lerc'h e voe gwelet adarre lunedoù ar gomer. Plijout a reas dezhi embann en doa labouret mat a-walc'h ar medisin evit un den ken yaouank-se. Ne daolas evezh ebet, avat, er c'helennoù en doa graet diwar-benn an doareoù da renkañ ac'hanon. Mailhuret e voen eta start ha strizh, dreist-holl e

traoù ma c'horf, evit ober nerzh d' am divesker ha d' am dargreiz. Aon a oa rak ar c'hamm, un droug a-ouenn er Vro Vigoudenn hervez brud. Ma divrec'h zoken a voe stardet din penn-da-benn gant ma divlez ken e oan re bar ouzh ur c'horfig balzamet pe, gwelloc'h c'hoazh, ouzh babig ginivelezh al liver-taolenoù La Tour, ma c'heller gwelout anezhañ e mirdi Roazhon. O vezañ na oa anv ebet er vro eus balzamedenn nag eus La Tour kennebeut, an dud a gefverie ar poupig er stad-se ouzh "un duilhad plouz keitet". An duilh-adoù-se, renket-brav war ur gwiskad balan, a dalveze deomp da gentañ galc'hed er gweleoù kloz. Bez' e c'hellan touiñ da nebeut-añ (goulennet 'z eus bet alies diganin) n' eo ket bet adstummet klopenn ma fenn gant daouarn Frañseza gozh e-giz ma veze graet c'hoazh e dibenn an naontekvet kantved ma rankefiziout e testi- enioù a zo. Dilazet abaoe pell oa an oberatadenn a genedoniezh-se. Ar gomer gozh Marijan ar Rest ne zalc'he soñj ebet da vezañ gwelet ober kement-se. Doareoù dreserien, a lavare-hi en ur dreuz-añ he genoù. Dreserien pe sorserien. N' o deus an dud-se netra d' ober gant ar re nevez-c'hanet. Ha Marijan, disprizus an tamm outi, a rae ur voutklenn ken gamm ma oa he lunedoù houarn war-bouez kouezhañ a-zivhar he fri. Hogen al lunedoù-se, eviti, a dalveze an holl baperoù-testeni.

Abalamour ma oa bet ur medisin gwiriet e-tal gwale e verc'h-kaer, ma zad-kozh ar botacuer en em blijo diwezhatoc'h d' ober ouzhon Mab Roue an Hiberni ha da ziouganiñ evidon ur vuhez leun a vrud hag a enorioù. Da c'hortoz, ma zad-kozh all, Alan ar Gow, en doa graet ober din, gant ar munuzer Piton, ur c'havell nevez e kistin eus ar c'hentañ, warnañ tachoù kouevr e-giz m' eo ret, ma lakae ma moereb Lizet anezhañ da lintrañ a-bouez divrec'h, goude koaret ganti, ha zoken e-raok din dont e-barzh. Ar c'havell-se (outañ hirio, d' ar mare m' emeon o skrivañ, hini ma mab bihan) a zo heñvel dres ouzh an hini nemetañ m' o doa kousket ennañ, an eil war-lerc'h egile, ma mamm, ma eontred ha ma moerebed. Hag e-doug an amzer ma oa bet graet gantañ e c'helled meleziouriañ en e goad. Da c'houde e voe prestet gant Alan ar Gow d' un amezeg, Yann-Vari ar P., ha ne oa ket dezhañ peadra da brenañ un evit e vugale. Yann-Vari a zalc'has anezhañ gantañ e-pad bloavezhioù, amzer d' herberc'hiañ ennañ ha da denañ dioutañ e varmouzed. War-dro daou viz a-raok din bezañ ganet, tad-kozh a gerzhas da c'houlenn an ardebeuri en-dro digant an amprester. Hemañ en

doa bac'het anezhañ e loñch ar yer, o vezañ m' en doa implij ebet dezhañ ken. Truezus stad ar c'havell, m' hel lavar deoc'h, goude bezañ talvezet da neizh ha da glud d' an evned. Ne fellas ket d' Alan ar Gow adkemer anezhañ. "Ne c'houzañvin ket, emezañ, ma vefe savet ma mab-bihan war gaoc'h-ye". Kontañ ' reas e wenneien ha kerkent kuit da gavout ar menuzer Piton.

Per-Jakez HELIAS.

Testenn da lakaat e brezhoneg

Des jardins profonds et secrets

Pendant la guerre, nous avions tous des poux, les épidémies de vermine ne chômaient guère et se poursuivirent un peu plus tard. Pour prévenir ce fléau, on nous avait tous ton- dus à ras, en laissant sur le devant une petite mèche de che- veux qui servait d'échantillon pour la teinte - les blonds, les bruns - et flottait d'une façon bizarre ; elle arrivait aussi à donner le change lorsque la casquette ou le béret étai- ent solidement en place. Ça c'était pour les garçons ; les fil- les avaient des poux dans leurs bouclettes, elles se les passai- ent au peigne fin, mais on ne pouvait tout de même pas faire l'a- vantage pour elles. En classe, nos crânes nus et blanchâtres a- chevaient de nous donner l' air intelligent ! C'est peut-être cet air désespérément ahuri qui incitait le maître à tant co- gner dessus - à main nue, avec un livre, une règle. La règle rebondissait sur l'ovale, bing ! Ça nous faisait la tête dure, c'était un plaisir ! On nous battait tous les jours. Trois-Pommes recevait une première ration le matin entre dix et onze. On le laissait se reposer une heure de ses trois kilomètres à pied pour venir à l'école, et puis, arrivée l'heure du problème - allez donc : la règle, les baffes !... On le rebattait l'après- midi pour la dictée, entre deux et trois heures, après la diges- tion... Il faut dire que la digestion était rapide parce qu'en général nous cassions la croûte sous le préau avec un morceau de quelque chose. C'était la pause pain-fromage, pain-oeuf dur, pain-boudin, pain n'importe quoi.

Donc, l'après-midi, nous avions dictée, et nous allions nous promener à Paris - c'est-à-dire que les petits textes que nous devions transcrire avec le moins de fautes possible tour- naient le plus souvent autour de quelque chose à propos de la capitale. Ce n'étaient que promenades rêveuses le long des quais de la Seine avec Anatole France, les tours de Notre-Dame avec Hugo, la colline de Chaillot avec un autre, les Grands Boulevards, que sais-je ? Un petit tour à Montmartre... On n'en sortait pas.

Moi, j'étais bien content, j'y étais allé à Paris, avant la guerre, à deux ans. D'une semaine sur l'autre, d'année en année, nous avons parcouru, comme ça, le jardin du Luxembourg en large et en travers, sans nous presser, d'un participe employé avec avoir, à l'autre employé avec être, à la suite d'Anatole France enfant, adulte, vieillissant... Il revenait, Anatole France, dans nos dictées et dans nos lectures, comme s'il avait à lui seul inventé la langue française !... Pluie d'automne : " La pluie froide et tranquille, qui tombe lentement du ciel gris, frappe mes vitres à petits coups, comme pour m'appeler... " (avec deux "p" et un seul "l"). Quand nous sortions de Paris, c'était pour aller à Rouen, avec Flaubert, ou à Strasbourg, avec Hugo encore, peut-être à Orléans - mais on ne descendait jamais plus bas. On n'a jamais fait une dictée sur Brive, ni sur Toulouse ou sur Clermont-Ferrand. La campagne était celle de Lamartine, Milly là-bas, le Mâconnais... C'était un fouillis de pampres et rameaux. Ou la Beauce, avec Zola, une étendue de sillons terrible, à perte de vue. Il est remarquable aussi que, dans les textes que l'on nous présentait, c'était toujours des chevaux - baptisés en général "lourds percherons" - qui tiraient l'inévitable charrue. C'était différent de chez nous où nous attelions les vaches. Tout était différent de chez nous. Les enfants avaient tous des airs propres, des cols marins ; ils n'allaient jamais garder les vaches ou les moutons. Ils vivaient dans un paradis perpétuel, avec des jardins profonds et secrets, des charmilles, de belles demeures, des bonnes d'enfants... Ils jouaient sur des étangs, eux, pas sur des godes ! Leurs arbres avaient des noms pleins de poésie, les hêtres, les érables... Parce que pour les arbres et les oiseaux, nous les connaissions avec leurs noms occitans ; nous savions aussi les noms en français, mais sans jamais les rattacher aux choses elles-mêmes. C'était encore plus joli, des noms d'arbres sans arbres ! Bref, dès que nous mettions le nez dans un livre de classe, nous ne quittions pas beaucoup la moitié nord de la France. Il était clair, implicitement, qu'il n'y avait pas bon bec d'Occitanie...

DUNETON,
"Parler croquant",
Stock, Editeur.

Fañch an Uhel

G W E R Z I O U

Un nebeut gwerziou am eus dibabet,
e-touez ar re embannet gant Fañch an Uhel,
evit Andrea ar Gouilh. Setu int amañ,
adskrivet evit hol lennerien, gant
Y.E. Abalan.

AN AOTROU KERSAOZON

I

Me 'm eus ur prosez en Roazhon
A laka glac'har em c'halon ;
Mar karfen roiñ ma fennhêrez,
'On sur da c'honit ma frosez ;

Mar karfen he roiñ da Gêrsaozon,
Hennezh 'zo barner en Roazhon.
An aotro eus a Gêrsaozon
A zo denjentil ha baron.

Tad ar bennhêrez a lare
D' e vevelien, un dez a voe :
- Mar arru Kêrsaozon amañ,
Diskouet ma fennhêrez dezhañ.

An dimezell a lavare
Da dud he zi, ar memes de :
- Mar arru Kêrsaozon amañ,
'N an' Doue, ma nac'het outañ ;

'N an' Doue outañ ma nac'het,
Me 'c'h a d' ar jardin da gousket...

II

'N aotrou Kersaoz a c'houlenne,
Barzh ar maner pa arrue :
- Demat ha joa er maner-mañ,
Ar bennhêrez, pa n' he gwelan ?

-Aet eo d' ar jardin da gousket,
Sellet dreist ar voger he gwelfet.
- N' vo dreist ar voger e sellin,
Daveti d' ar jardin ec'h in.

- Demat dec'h-c'hwi, flourdilizenn,
C'hwi 'zo kaer 'vel ur steredenn ;
C'hwi 'zo kaer 'vel ur steredenn,
Me 'zo du 'vel ur vouarenn.

- N' eo ket an aour hag an arc'hant
War ho tro ho lakafe koant,
Ma eo al laou hag ar pilho
A zo ouzhoc'h a druilhado .

Diwezhañ 'oac'h-deut d' am gwelet,
Da war inkane amprestet,
En penn ho marc'h ur gabestrenn,
War ho tiv'sker gweltro lien.

- Mar oan-me deuet d' ho kwelet
War un inkane amprestet,
Mar karjen, pennhêrez, n' oan ket,
Rak a-walc'h am eus a gezeg.

Bezañ 'zo karroñs 'n toull ar porzh,
Pennhêrezig, ouzh ho kortoz.
Warnezhañ tri inkane gwenn,
Pep a vrid arc'hant en o fenn.

- 'Vit ouzh ma gortoz n' emaint ket,
Rak da Gêrsaozon na in ket ;
'Vit da Gêrsaozon na in ket,
Ur wezh on bet, 'on kontantet.

Mann a-feson n' am eus gwelet,
Met ur c'hozh kastell iliavek :
Met ur c'hozh kastell iliavek,
'Zo mat da neizh d' ar c'haouenned.

En kreiz ar porzh 'zo ur poull-pri,
Hag un daou pe dri a houldi,
Ur wrac'hig kozh ouzh o gouarn,
Gant aon 'afent gant al louarn !...

- Ma fennhêrez, c'hwi 'zo manket,
'Vezañ Kêrsaoz dizoblijet,
Rak an eotrou a Gêrsaozon
A zo denjentil ha baron.

- Me ne roan ket kaz a se,
Kêrsaozon ne blij ket din-me ;
Hag 'rankfen mont da glask ma boued,
Evit Kêrsaozon n' am bo ket !

Kanet gant ma mamm,
en Kêrarnborn, 1849.

FANCHIG MORVAN

I

- D' ar pardon da Vulad ec'h an,
Kofje, ma zad, a c'houlennan.

- Mar eo kofje a c'houlennet,
Piv ho kompagnunez da vonet ?

- Fañchig Morvan, hennezh 'c'h a di,
Hennezh, ma zad, 'vo pried din.

II

Barzh en Bulad p' int arruet,
En ostaleri int diskennet ;

En ostaleri int diskennet,
Goulenn da lojañ o deus graet.

Ostizez, din-me lavaret,
Ha daou wele dimp a rofet ?

Ha daou wele dimp a rofet,
Rak ni na omp ket daou bried.

N' oa ket e c'her peurlavaret,
Ur c'habiten 'zo antreet :

- Fañchig Morvan, larez-te din
Ha te ' rofe da vestrez din ?

- Gwell 've ganen koll ma buhe ,
Evit roiñ dit ma c'harante .

Az c'habiten, 'vel ma klevas,
Gant Fañchig Morvan e lammas ;

Gant Fañchig Morvan e lammas,
Kerkent eno hen douaras.

Fañchig a oa lijer ha skañv,
Hag a savas prim en e sav :

Ar soudarded pa hen gweljont,
Gant Fañchig Morvan e lammjont,

Hag adarre hen douarjont,
Ha kerKent eno hen lazhjont.

Ar plac'hig yaouank a ouele,
Na gave den he c'hoñsolje ;

Ne gave den he c'hoñsolje,
Met ar c'habiten, hennezh 'rae ;

Hennezh ' lare dezhi bepred :
- Tavet, plac'hig, na ouelet ket,

C'hwi ' deuy ganen war ar pave,
Ma soudarded a deuy goude ;

C'hwi a deuy ganen war ar ru,
Ma soudarded a bep-a-du.

- Aotrou kabiten, m' am c'haret,
Ho kontell din-me a brestfet ;

Ho kontell din, pe ho pognard,
Da droc'hañ ma las, 'zo re start.

N' eo ket he las he deus troc'het,
En he c'halon ' deus he flantet !

Pa distro 'r c'habiten en-dro,
Da ar plac'hig war he geno ;

Da ar plac'hig war he geno ,
Ar gwad 'dani a boullado :

- Panevet daonñ ma ene,
N' oas ket aet gwerc'hez dirak Doue !

Pa varv an eil 'vit egile,
Ne ve ket fin d' ar garante !

Kanet gant Fant ar Gag,
eus a Werleskin.

MIBIEN EURED

I

- Ma breur Markig, eomp hon-daou
D' an nozvezh vras da Goadurjaou.

- Ma breur Robart, chomomp er gêr,
Rak ur gwall nozvezh a ziger.

- Na chomfomp, ha ne dalefomp,
P' hon eus kofje, mont a refomp.

Ha pa oant prest da bartiañ,
Komañs ar c'hleier da vrallañ ;

' Komañs ar c'hleier da vrallañ,
Tan ha kurun an orzuplañ.

II

En Koadurjaou p' int arruet,
An nor serret o deus kavet ;

An nor serret o deus kavet,
Holl dud an ti aet da gousket.

Markig Eured a lavare
En toull an nor, hag en-noz-sé :

- Ma c'homper, digoret-c'hwi din,
Evit ' am bo tan da fumañ.

- An nor dec'h ne digorin ket,
Klevet am eus oc'h gwall baotred.

N' eo ket e c'her peurlavaret,
An nor en ti o deus taolet ;

An nor en ti o deus taolet,
An Triquier kozh o deus lazhhet.

Merc'h an Triquier a lavare
Diwar hec'h ilin, 'n he gwele :

- Ha pa goustfe din pemp mil skoed,
Me ' lakay krougañ Robart Eured !

Me ' lakay krougañ Robart Eured,
E vreur Markig ne laran ket ;

E vreur Markig ne laran ket,
Hennezh a rankan da gavet.

War o c'hil en ti int bet aet,
Holl dud an ti o deus lazhet ;

Holl dud an ti o deus lazhet,
An tan warne o deus laket !

III

Triwec'h archer a zo kaset
D' vont da gemer mibien Eured.

An triwec'h archer ' c'houlenne,
Er gêr vihan, war ar pave :

- Paotred yaouank, dimp-ni laret
C'hwi 'c'h eus gwelet mibien Eured ?

- Mar eo paotred Eured ' glasket,
Distroet amañ, o gwelfet ;

Distroet amañ o gwelfet,
Me ' gred eo oute e komzet.

Teir eur hag hanter ec'h int bet
'C'hoari ar c'hleve, ar fleuret ;

'Benn ma oa peder eur sonet,
Seitek an'e a oa lazhet ;

Seitek an'e a oa lazhet,
Nemet unan na eus chomet.

Markig Eured a lavare
D' an hini 'oa chomet, neuze :

- Me a lez ganit da vuhe,
D' vont da glask sikour adarre.

IV

Un archer seitek vloaz 'lare
D' an archer paour, pa hen gwele :

- Ma breur archer, din-me laret,
Pelec'h oc'h bet, pelec'h ma 'z et ?

- Triwec'h archer e oamp kaset
D' vont da gemer mibien Eured ;

D' vont da gemer mibien Eured,
Seitek ac'hanomp 'zo lazhet ;

Seitek ac'hanomp 'zo lazhet,
Nemedon-me na eus chomet ;

O deus lest ganen ma buhe,
D' vont da glask sikour adarre.

An archer seitek vloaz 'lare
D' e vreur archer eno, neuze :

- Me ac'h e ma-unan ive,
Da c'hoût ha me o erefe.

V

An archer seitek vloaz 'c'houlenne,
Er gêr vihan pa arrue :

- Paotred yaouank, din-me laret,
C'hwi 'c'h eus gwelet paotred Eured ?

- Mar eo mibien Eured 'glasket,
Distroet amañ, o gwelfet ;

Distroet amañ, o gwelfet,
Me 'gred eo oute e komzet.

Div eur hag hanter ez int bet
O c'hoari 'r c'hleve, ar fleuret,

Ha 'benn ma oa teir eur sonet,
Robart Eured 'oa erret.

An archer seitek vloaz 'lare
Da Robart Eured, en de-se :

- Biskoazh ma far n' am eus kavet,
Biskoazh gant mamm n' eo bet ganet ;

Biskoazh gant mamm n'eo bet ganet,
Nemet da vreur Markig Eured.

N' oa ket e c'har poulavaret,
Markig Eured 'zo arruet.

Triwec'h troatad a uhelder
E lamm Markig Eured en aer ;
E lamm Markig Eured en aer,
'N archer seitek vloaz 'n he gefver.

Teir eur hag hanter ez int bet
O c'hoari 'r c'hleve, ar fleuret ;

'Barzh ma oa peder eur sonet,
E alan d' an archer 'zo market.

Markig Eured a lavare
D' e vreur Robert, eno, neuze :

- Aze, ma breur, e oas tizhet,
Panevet 'r paotr mat Markig Eured !

Eomp bremañ d' hon gwele da gousket,
Pa eo ar gombad achuet.

Kanet gant GARANDEL
(kompagnun dall),
Plouared - 1845.

FIEKR JAVRE

I

Fiekr Javre a barrouz Prad,
Bravañ peizant a wisk dilhad.

Petra ! dalv dezhañ bezañ brav,
Na pa eo barnet d' ar marv ?

P' eo barnet d' ar marv kruel,
Mont da dal porzh e dad da vervel ?

II

P' ae Fiekr Javre d' an ofer'nn-bred,
Eñ ne soñje en droug ebet.

Pa oa gant an hent o vonet,
Ur gribierez 'n eus rankotret :

- Fiekr Javre, kerzh-te d' ar gêr,
Ha lazhañ da wreg ha da vugel,

Hag 'vefomp hon-daou eursujet,
Da derc'hel ostaleri d' an Ormet (?)

Da derc'hel ostaleri d' an Orme,
Ni'vo bravañ daou a vale.

Fiekr Javre, p' en 'eus klevet,
Doc'htu d' ar gêr 'zo distroet.

Pa oa oc'h antren 'barzh an ti,
E oa e wreg o tijuniñ ;

O tijuniñ e-tal an tan,
Hag o roiñ bronn d' he mab bihan.

Hag eñ o vont gant minc'hoarzhin,
Ha plantañ e gontell enni.

- Fiekr Javre, ma skoet 't eus,
Ma skoet a 't eus d' ar marv !

Kae d' glask beleg d' am c'hovesaat,
Medisin da stankañ ma gwad !

- Da glask beleg dec'h me n' in ket,
Nag ur medisin kenneubet ;

Nag ur medisin kenneubet,
Rak ac'hanon e ve komzet.

- Me 'laro, ' trailhañ kig diwar 'r skabell
'Vin bet koueet war ma c'hontell.

Fiekr Javre a vofjoure
Er presbital pa arruet :

- Aotrou 'r person, mar am c'haret,
Da nouiñ ma gwreg e teufet.

- Petra gant da wreg 'zo c'hoarveet ?
En ofer'nn-veure 'm boa he gwelet.

En ofer'nn-veure 'm boa he gwelet,
Hag hi en kreiz he joausted.

- O trailhañ kig diwar ur skabell
Eo bet koueet war he c'hontell.

Pa oant gant an hent o tonet,
Tri element o deus gwelet ;

'Da ur sarpann hag un touseg,
Un naer-wiber eus o redek.

- Setu aze tri drouk-spered,
Daoust piv 'c'hanomp 'zo en pec'hed ?

'Barzh an ti pa int arruet,
Ar beleg d' ar wreg 'n eus laret :

- Petra 'zo ganec'h c'hoarveet ,
Me 'm boa 'n ofer'nn-veure ho kwelet ?

Me 'm boa 'n ofer'nn-veure ho kwelet,
Ha c'hwi en kreiz ho joausted.

- 'Trailhañ kig diwar ur skabell
'On bet koueet war ma c'hontell.

Ur bugelig a oa en ti,
Dajet a daou viz pe a dri :

- Ma mammig paour, n' em daonet ket,
Ofañsiñ Doue kenneubet ;
Ofañsiñ Doue kenneubet,
Rak ma zad en 'eus ho lazhet !

Fiekr Javre a lavare
Na d' e vabig, er momec-se :

- Hemañ a zo ur bugel mat,
Hag e laka krougañ e dad !

Kanet gant Marc'harid FULUP.

- SKRID -

Kelaouenn savet e Kevrenn Geltiek Skol-Veur
Breizh-Uhel Roazhon .

R O L L A R P E N N A D O U (niverenn 1)

R.F. RETAMAR : Te , Dispac'h (tr. A.M. Trelu) ; R.F. RETAMAR :
Bro (tr. Herve Thomas) ; R.F. RETAMAR : Ar vouezh (tr. Per
Denez) ; REINER KUNZE : Karantez (tr. Ernest Olier) , pourme-
nadenn betek ur palez ; LOEIZ GWILHOU : Heol a viz Mae ; LIZA
GIZIOU : Da-unan ; LIZA GIZIOU : Gwennili ; LIZA GIZIOU : Selaou,
mignon ; VOLKER BRAUN : Kemenn d'ar yaouankiz aet kozh (tr. A.
Kerembelleg) ; MIKAEL BURLLOT : Paotr al laezh ; ANNAIG KERVELLA :
Ma c'hazh ; VOLKER BRAUN : Kimiad (tr. Per Denez) ; Yann Erwan
AR C'HORR : Istor da lenn d'ar vugale diouzh an noz ; Diwar an
okitaneg : PEDER BARZHONEG ; JEF PHILIPPE : Arabat bezañ eureus ;
JEF PHILIPPE : Dispak ; JEF PHILIPPE : Amourouzien ; HERVE AR
BEG : Va devezh kentañ e Dulenn ;
ENVOR YANN JAUEN -- skrivet gant ↔ Per DENEZ : Yann Jaouen ;
Skeudenn Yann Jaouen ; PER DENEZ : Kanaouenn evit Yann Jaouen ;
YANN JAUEN : Diwar-benn ar barzhoneg ; Troidigezhioù diwar ar
spagnoleg ; Troidigezh diwar lako Novomesky ;
MANUEL MARIA

EURIOU BRO GALAÏKAÏA

Troidigezhioù gant Yann Jaouen

- N I V E R E N N 2 -

Jef PHILIPPE : Barzhonegoù (Huzil , Deiz , Prad Bev , Erc'h ,
Hent) ; Gwendal DENEZ : Hurlink e skeud an dremwelioù
merglet ; R.F. RETAMAR : E safar ar bobl(tr;Y.B. KIOK)
Bernez ROUS : N'eus ket hanter a-walc'h a dud evit ar varzhoniezh
a zo ; A.V. TRELLOU : Fri-moutig e Bro ar Bleunioù , Paotred
Bro-Gembre , Ar marmouz bihan trist ; Joan LARZAC : Istor bev
(tr. Loeiz Gwilhou) ; Gwendal DENEZ : Roazhon-blues ; Y.B.
RIVALEN : Ur gontadenn Nedeleg ; Bernat LESFARGAS : Frankofoni
(tr. Jaklin Pennanec'h) ; ATAHUALPA YUPANQUI : Hag ar mein a
gane (tr. Y.E. AR C'HORR) ; Y.E. AR C'HORR : E ti ar barzh e
Kembre ; Laco NOVOMESKY : Er vatéh (Jorj BELZ) ; LENINE :
Ar sokialouriezh ha gwir ar broadoù da vezañ emren (Herve ar
Beg) ; TIM SAUNDERS : Barzhonegoù kernevek ; Y.E. ABALAN :
Sivi ; LACO NOVOMESKY : Serr-noz (Job Kotel) ; Roy Lennard

NICHOLSON : Damskeudenn (Rivanon KERVELLA) ; Jorj BELZ :
Furnez er vro ; Bernat LESKARGAS : Barzhoneg (Yann JAUEN)
Bernat LESFARGAS : (Yann JAUEN) ; R.F. RETAMAR (M.Th.PRIGENT) :
Ar gerzhadeg ; H.BOLL(Annaig KERVELLA) : Marv Elsa Baskoleit ;
Volker BRAUN(Loeiz Gwilhou)

N I V E R E N N 3.

MARI ANN : Mezh am eus bet ; JOAN LARZAC : Marvet gant petra
(tr. Rivanon KERVELLA) ; MORWENA DENEZ : Ene Erin , An den hag
ar mor ; JEAN RAY : Nozvezh Camberwell (Y.V. AR C'HOK) ; Y.E.
AR MOEGN : Stank an ifern ; RAY BRADBURY : Ur vaouez o c'hermal
(Mark KERRAIN) ; MAKOTO : D'ar gwele evit ar vro ; EDWARD D.
HECH : An hini a oa e pep lec'h (Y.V. AR C'HOK) ; MARI ANN :
Buhez ur Vreizhadeg an deiz hirie ; ZAIG : Barzhonegoù ; LOIG
ER SKOUARNEG : Kañeur Eliz Ségehan ; YANN KERAUZERN : Barzhonegoù ;
SEAMUS M. MAC AN T-SAQIR : Barzhonegoù iwerzhonek ; BERNAT
LESFARGAS : Francophonie (Rivanon KERVELLA) ; ROTLAND PECOT :
Graet hon eus hor soñj e vo ar gwir ganeomp .

N I V E R E N N 4 .

Heinz KAHLAU : Barzhonegoù (Herle DENEZ) ; Liza GIZIOU :
Klemmoù ar chatibi ; Mark KERRAIN : Distro ; Jorj BELZ :
Mar a vle goude(Brezel 14) , Barhoniñ hun amzer-ni , Più en
des choejet , Skrap ar skrap ; Yann-Frañch AR GO : Ar vereuri ;
Bernez ROUS : Al Liamm hag e goumananterien ; Boris VIAN :
Barzhonegoù (F. KERKAVEN) ; Yann-Bar BOUCHER : E Keltia gozh ;
Mikael BURLLOT : Kenavo ; Alan FICHET : Kejadenn ; Alan AN
AFFETER : Tud ar goañv ; Eujen KONAN : Ar sevel-istr e-barzh an
dour don e pleg-mor Sant-Brieg ; M.N. GWEGEN : Ur bourk ;
Gweltaz HAMEL : Buhez hon tadoù en o menajoù levezet pe
zilevenez ; M.P. RETY : Ma bugaleaj war ar maez ; Frañch
KERKAVEN : Diwar-benn "Faut qu'ça bosse" ;

Koumanant evit peder niverenn : 20,00 lur da gas dre chekenn-
bost da P. DENIS , CCP 1499-51 Rennes . Ar chekennoù-bank a
zo da vezañ kaset da b-Per DENEZ , Section de Celtique , Uni-
versité de Haute-Bretagne , 35000 RENNES-Villejean .
Evit kaout an niverennoù unan-hag-unan skrivañ da :
Makoto NOGUTI , Section de Celtique , Université de Haute-
Bretagne , 35000 RENNES-Villejean , ha kas dezhañ ur chekenn
war e anv pe war anv Per DENEZ .

SKOLIDI AR BREZHONEG

Niver ar skolidi a studi brezhoneg en Akademiezh Roazhon e 1973-1974 , skolioù eil derez :

1943 e skolioù ar stad

1719 er skolioù prevez

en holl : 3662

(sifroù ar rektordi)

UR SKOL DRE LIZHER NEVEZ

Anavezet mat eo Skol dre Lizher OBER , savet e 1925 ha renet gant Marc'harid Gourlaouen abaoe , zoken ma'z eo bremañ diazezet ar skol e Sant Brieg . Chomlec'h nevez SKOL OBER : 28 rue des 3 Frères Le Goff , 22000 St BRIEG .

Ur skol nevez a zo bet savet bloaz zo e "Télé-Enseignement" Roazhon . Warlene ez eus bet enskrivet 40 studier er bloavezh kentañ , 14 en eil bloavezh ha 19 en trede bloavezh . Kalz muioc'h a zo er bloaz-mañ . Hag adalek ar bloaz-mañ ez eo digor ar skol D'AN HOLL , ha n'eo ket d'ar studierien hepken . Ar re n'int ket studierien , avat , pe ar studierien n'eo ket anavezet ar brezhoneg evel danvez-arnodenn gant ar Skol-Veur int stag outi , n'hellont ket tremen an arnodenn e dibenn ar bloaz . A-hend-all e vez hñvel ar c'hentelioù , an dalc'hoù-labour , ha pep tra , evit an holl .

Ar skol a zo enni , er bloaz-mañ , tri derez , termenet hervez an arnodennoù prientet : UVI , UV2 hag UV3 . UVI a zo evit ar re na ouzont tamm brezhoneg ebet . UV2 a zo evit ar re o deus heuliet dija , pe a heuilh war un dro , kentelioù UVI . UV3 a zo evit ar re o deus echu gant kentelioù UVI hag UV2 , pe a zo brezhonegerien a-vihanik . Pep UV a zo kevatal gant 2 eurvezh kentelioù hag un eur labourva .

Gant levrioù Per Denez e vez graet er skol dre lizher-se .

En doare-mañ e vez aozet ar c'heleñn :

1. pep studier e vez kaset dezhañ notennoù diwar-benn pep kentel ;

2. reizhet e vez dezhañ , dre skrid , e boelladennoù ;

3. kaset e vez dezhañ , war e c'houlenn , bandennoù minikasedig warno ar poelladennoù reizhet hag ivez divizoù a dalvez da boelladennoù emc'hourdonañ .

Diskleriadurioù digant : Centre de Téléenseignement , Université de Haute Bretagne , avenue Gaston Berger , 35000 Rennes-Villejean .

LEVRIOU PER DENEZ

Anavezet mat eo al levr kentelioù BREZHONEG BUAN HAG AES . War un dro gantañ ez eus ul levrig reizhadennoù ha troidigezhioù , hag ivez enskrivadurioù war bladennoù pe war vinikasedoù . (Priz al levr : 18,50 L. - priz al levr reizhadennoù ha troidigezhioù : 4 L - priz an daou levr + ar bladennoù : 9 L - priz an daou levr + minikasedoù : 100 lur) .

Evit sikour ar gelennerien ez eus bet lakaet ober , gant un arzour mat eus Douarnenez , Rene Kere , ur rummad TAOLENNOU , 26 anezho en holl , o klotañ gant kentelioù al levr . War an taolennoù-se , livet brav hag ampart , ez eus kement a zo ezhomm evit ober aes ar gentel . Un daolenngetañ a ziskouez , en ur seurt poltred familh , an dud a zo anv anezho a-hed al levr ; a-hend-all ez eus un daolenn dre gentel . Savet eo bet an taolennoù gant unan a anavez mat Daouarnenez , ha skoazellet eo bet an arzour gant Per Denez ha Gwendal Denez evit pezh a sell ouzh an danvez da lakaat , dre ret , e pep taolenn . Gwerzhet e vo an taolennoù-se e stumm diapozitivoù ha skeudennaù liv . E gwerzh e vint a-barzh ma vo deut er-maez an niverenn-mañ eus HOR YEZH .

A-hend-all eo anavezet ivez al levr KOMZOMP HA SKRIVOMP BREZHONEG . Al levr-se a zo ennañ auzhpenn 800 poelladenn o tennañ da gentelioù BREZHONEG BUAN HAG AES . Evit gwir , kement hini a fell dezhañ tennañ implij leun eus ar c'hentelioù hag aprouiñ dibaouez ar pezh a zesk , ivez deskiñ OBER gant ar pezh a zesk , a rank implijout KOMZOMP HA SKRIVOMP war un dro gant al levr kentelioù . Gant KOMZOMP HA SKRIVOMP e vez lakaet da dalvezout ar reolennoù yezhadur hag ar geriadur a ra danvez kentelioù BREZHONEG BUAN HAG AES . Gant KOMZOMP HA SKRIVOMP BREZHONEG e c'heller kas ar studi war-raok , en un doare ingal hag evezhiek . Evit ar gelennerien , ez eus aze ur vammenn a boelladennoù a vo diaes he c'has da hesk .

A-hend-all DEUT EO BREMAN ER-MAEZ ar minikasedoù a ya da heul al levr-se . En un doare aketus ez eus bet enskrivet un niver eus poelladennoù al levr : da lavarout eo eo bet graet an enskrivadur gant komzerien

ampart hag evezhiek , brezhonegerien a-vihanik boas ouzh ar yezh skrivet , hag e labourva gwellañ Roazhon . Enskrivet eo ar poelladennoù gant mareadoù digomz etre ar frazennoù evit reiñ tu d'ar studier da gentañ da respont ha d'an eil da adlavarout ar respont reizh . E seurt doare e c'hell an deskard , dibaouez , n'eo ket hepken lakaat da dalvezout ar pezh en deus desket , met ivez keñveriañ e zistagadur gant an distagadur-skouer roet dezhañ .

Daou levr all a zo bet roet d'ar mouler gant ti OMNIVOX : SKRIDOU BREZHONEK , un dibab pennadoù skeuden naouet gant al luc'hskeudennar yaouank R. Kernez hag ul levr divizoù , BREZHONEG BEMDEZ , skeudennet gant Nono .

LEVRIG AR C'HENDALC'H KELTIEK

Kaset e vo deoc'h hepdale levrig ar C'hendalc'h Keltiek . UR PROF EO A-BERZH HOR YEZH . Ne vo netra da baeañ ha ne gont ket al levrig-se e-touez niverennoù ho komanant .

Al levrig a zo ennañ ur bern diskleriadurioù diwar-benn ar broioù keltiek , hag ivez un niver chomlec'hioù talvoudus . Skouerennoù all a vo kaset deoc'h ma fell deoc'h : 3,00 lur ar skouerenn , franko . Goulennit digant HOR YEZH .

BUHEZ DEBAUVAIS

N'eo bet buhez an Itron Debauvais na sioul nag aes ha n'eo ket bet kaset o tastum madoù . Emañ-hi bremañ o werzhañ kement pezh arrebeuri , kement pezh podiri , kement traig a dalvoudegezh a zo chomet ganti a-benn kaout ar hant a-walc'h da voulañ EIL LEVR istor buhez he gwaz . El levr-se, muoc'h c'hoazh eget en hini kentañ , e vo kavet traoù talvoudus diwar-benn an emsav , peogwir e tenno da vare Breiz Atao . Daoust ha prenet hoc'h eus al levr kentañ ? Ma n'hooc'h eus ket , prenit bremañ ! Dellezout a ra an Itr. Debauvais , ur vaouez kalonek anezhi , bezañ skoazellet . Anv al levr : Fransez Debauvais , de Breiz Atao , et les siens Priz : 35 lur (lakait 3 lur mizoù-kas ouzhpenn ma fell deoc'h) Chomlec'h : Itron Debauvais , 20 place des Lices , Rennes CCP 2656-42N Rennes .

DEVEZHIOU STUDI EVIT AR GELENNERIEN WAR AR BREZHONEG .

Un devezh-studi evit ar gelennerien a zo bet graet e Kevrenn Keltiek , Skol-Veur Breizh Uhel , Roazhon , e derou an trimiziad kentañ : un 40 kelenner bennak a oa deut . Devezhioù-studi all a vo graet , daou anezho en eil trimiziad . An dud a zo dedennet a c'hell skrivañ da sekretourva ar Gevrenn , Skol-Veur Breizh Uhel , av. Gaston Berger : Roazhon .

SKRID

Niverenn 4 ar gelaouenn SKRID a zo bet kaset d'ar goumanantarienn en eil sizhun miz Genver . Prest e vo hepdale an niverennoù 5 ha 6 . Koumanant : 20,00 lur . Kas an arc'hant da :

Makoto Noguti , Bibliothèque , Section de Celtique , Université de Haute-Bretagne , Rennes Villejean
Per Denez , Section de Celtique , memes chomlec'h
pe c'hoazh P. Denis , CCP I499-5I Rennes

PRIZ AR C'HOUMANANT

Abaoe bloavezhioù n'eo ket bet kresket priz ar c'houmanant da HOR YEZH . E-keit-se ez eo aet priz ar vuhez war greskiñ , ha n'eo ket un tammig , ha priz ar paper gwashoc'h eget forzh peseurt tra all . Gant-se ne c'hellomp ket , siwazh , lezel ar c'houmanant ken izel hag 20 lur . ADALEK AN NIVERENN 97 - da lavarout eo adalek an niverenn a zeu - e vo 30 lur priz ar c'houmanant .

Ur wech c'hoazh e lavaromp e talvez ar c'houmanant evit peder niverenn . E pep niverenn e vez , da nebeutañ , 50 pajenn . Ne zeu ket HOR YEZH er-maez en un doare ingal : klask a reomp lakaat ar gelaouenn da vezañ embannet ur wech bep daou viz . Pa vez bet resevet ganeoc'h 4 niverenn , e c'houlennomp ho koumanant en-dro . Kas a reomp bepred ur ger da lavarout eo bet degemeret an adkoumanant ha da verkañ evit peseurt niverennoù e talvez .

A-wechoù (n'eo ket alies ha ne blij ket deomp) ez embannomp niverennoù doubl : neuze e kontont en ho koumanant evit div niverenn , anat eo . An niverennoù-doubl a vez enno 200 pajenn da nebeutañ .

NEUZE , ADALEK AN NIVERENN 97 , KOUMANANT : 30 LUR .

UL LEVRIG TALVOUDUS :

Gwennole Le Menn : OU EN SONT LES ETUDES DE BRETON . Ur studiademn diwar-benn kement a vez graet e brezhoneg hag evit ar brezhoneg ,

gant ul levrlennadur eus ar pouezusañ . 5,00 lur digant
Gwennole LE MENN , 15 allée des Frégates , 22000 ST BRIEUC

DICTIONNAIRE ETYMOLOGIQUE DE LA LANGUE BRETONNE GANT DOM LE
PELLETIER

Embannet dre luc'hskeudenn diwar an dornskrid . Biskoazh o'hoazh
ne oa bet embannet klok an dornskrid . Deut er-maez levrennoù
I, II ha III , en holl 1332 bajenn . Ul levr all da zont er-maez ,
ennañ testennoù , yezhadur ha notennoù .

AR PEDER LEVRENN , franko : 250 lur .

Kaset e vez an teir levrenn embannet kerent ha resevet an
arc'hant . Kas ar goulennoù da : Bibliothèque Municipale ,
Rue de la Borderie , Rennes . Chekenn war anv : Mr le Receveur
Municipal de la ville de Rennes . Lakat ar chekenn en hevelep
golo hag ar goulen .

SKOL

TEIR niverenn eus SKOL a vo kaset hepdale d'ar goumanterien ,
div anezho niverennoù-doubl : unan a zo ur GEOLOGIEZH gant
L. Kergoat , eben a zo un droidigezh gant E. AR BARZHIG .
Koumanantit : 20 lur (betek gwelout !)
Yola Chariou , 16 rue Hector Berlioz , 22000 St BRIEG
CCP Yola Chariou - Skol 2616-33 Rennes .

LE PROBLEME NATIONAL CATALAN

ul levr a-bouez gant Jaume Rossinyol , raskrid gant Guy Heraud
Embannet gant Mouton , La Haye .
VIII+710 pajenn + I7 kartenn pe daolenn : 88 lur .

DASTUM

Magnéthèque Nationale Bretonne
Prenit o embannadurioù : 27 lur ar c'haier + ar minikasedig pe
ar bladenn pe ar vandenn . DASTUM 8 rue du Rouergue , 29200 BREST

CYMBEITHAS YR IAITH : SKOL BASK 26 - 30 a viz Meurzh er Bala .
Diskleriadurioù digant : Arfon Gwilym , Y Cymro , Caxton Press ,
Oswestry , Salop .

KLENNADUREZH AR BREZHONEG . Studierien : I39 e Brest , 549 e
Roazon (Skol-Veur Breizh Uhel) e 1974-1975 . Skolidi : II84
en eil klas , IO47 e kentañ klas (1973-74) . Bachelouriezh :
933 e 1974 (275 e 1969) . - Sifroù ar Prefektur

KENDALC'H KELTIK ETREVROADEL 1975

E Cliff Head Hotel , Carlyon Bay , ST. AUSTELL , Cornwall .

Eus an 31 a viz Meurzh betek ar 5 a viz Ebrel .

Testenn : An douristelezh hag hec'h efed war ar Broioù

Keltiek

Kregiñ a ra ar C'hendalc'h d'an 31 a viz Meurzh diouzh an noz .
Echuiñ a ra d'ar Sadorn 5 diouzh ar mintin .

Bez e vo dalc'hoù labour war an danvez kinniget d'ar C'hon-
dalc'h , abadennoù kan ha sonerezh , hag ur weladenn d'ul
labouradeg porselen .

Evit dero'hel plas en ostaleri , skrivañ WAR-BEUN d'ar
Cliff Head Hotel .

Boued ha Lojeiz marc'hadmatoc'h a vo pourchaset evit ar re
yaouank .

Sekretour ar C'hendalc'h a zo ;

B.A. HOOPER , 93 Mount Pleasant Road , CAMBORNE , Cornwall

KENDALC'H ETREVROADEL AR STUDIOU KELTIK

Da vezañ graet eus ar 5 a viz Ebrel betek an 13 . E Kernev-
Veur ivez , e PENZANCE

Ar sekretourva a zo International Congress of
Celtic Studies Trevenon House ; POOL , Redruth , Cornwall .

Jean MARKALE La TRADITION CELTIQUE en Bretagne armoricaine
Le Regard de l'Histoire, Payot . 332 bajenn .

Ul levr nevez gant an Ae. Markale , skrivet gant ur bluenn
aes ha gant kalz a ampartiz . Ul levr a roio c'hoant d'an dud
d'ober gwelloc'h ha donoc'h anaoudegezh gant hengoun Keltia .

O PAOUEZ DONT ER—MAEZ :

DICTIONNAIRE ÉTYMOLOGIQUE
DU BRETON
ANCIEN, MOYEN ET MODERNE
(ORIGINE ET HISTOIRE DES MOTS)

gant

Christian—J. GUYONVARCH,
Mestr—Skoazellour e Skol—Veur Breizh—Uhel,

ennañ ur c'hentskrid gant an Ao. Jean GAGNEPAIN, kelennar war ar yezhoniezh, hag ur raklavar gant an Ao. Léon FLEURIOT, kelennar war ar c'heltieg e Skol—Veur Breizh—Uhel e Roazhon.

Ken pouezus eo al labour-mañ hag ar *Geiriadur Prifysgol Cymru* embannet gant skolioù meur. Kembre hag ar *Contributions to a Dictionary of the Irish Language* embannet gant Akademiezh Roueel Iwerzhon. Gant skoazell Skol—Veur Breizh—Uhel eo embannet al levr.

Da gentañ holl e tiskleir-eh en un doare diogel ha resis ar gerioù brezhoneg e-keñver ar c'herdarzhadurezh, an istor hag ar genyezhoniezh, adalek ar penn kentañ. Er geriadur-mañ eo savet evit ar wech kentañ roll an holl c'herioù, ar re ma'z eo keltieg o orin kerkoulz hag ar re a orin roman pe latin. Diazezet eo dre se gant diogelder kendarempredoù ar brezhoneg gant ar yezhoù keltieg all, a zo kar—nes dezhañ, ha gant ar galleg pe ar rannyezhoù romaneg, m'en deus amprestet diganto ul lod bras eus e c'herioù, boutin pe get.

Diskleriet eo ar gerioù diouzh un tu evel m'armaint bremañ er rannyezhoù, ha diouzh un tu-all hervez o emdroidigezh a-hed istor ar yezh, adal o emziskouezhidigezh kentañ, evel ma'z int bet skrivet hag implijet er geriadurioù hag en testennoù a bep seurt (hep lezel a gostez an dialloù, an anvioù—lec'hioù hag an anvioù tud) en henvrezhoneg, e brezhoneg krenn hag er yezh a-vremañ. Bep gwech e vez meneget pajenn al levr pe ar skrid ma'z eo bet implijet ar ger ennañ. Dre-se e tegas ar geriadur-mañ ur sklerijenñ nevez war ar yezh. Dreistholl e sklaera istor hag emdroidigezh ar brezhoneg krenn, na deo ket bet studiet kalz abaoe an daou—ugent vloaz bennak, hag e wella ivez hon anaoudegezhioù war stad hag istor ar yezh rakvodern, hini ar seitekvet hag an triwec'hvet kantved, na deo bet biskoazh studiet penn-da-benn betekhen.

N'eo ket ul levr o tiskleriañ ur gelennadurezh bennak a yezhoniezh : an oberour — hag a gelenn e Roazhon ivez an iwerzhoneg ha sevenadur ar Galted kozh — en deus graet e wellañ, gant aked bras, evit kinnig d'al lennerien darvoudoù ha traoù gwiriet hag amprouet hepken; bihanaet en deus ar muiañ ma c'helle tachenn ar martezeadennoù. O vezañ dastumet ouzhpenn se skiant ha gouiziegezh war danvez ar yezhoniezh hag an etimologiezh abaoe meur a vloaz eo bet gouest da ziazezañ ha da zigolaat studi ar c'henglotadurioù brezhoneg ha keltieg.

Betekhen n'eo bet studiet aketus ar brezhoneg nemet gant un nebeudig a yezhoniourien, hag ar geltiegourien o—unan n'o deus ket pleustret kalz warnañ. A bouez bras e oa rak se diskouez evit mad penaos ez eus er brezhoneg — hag a zo koulz lavarout, en abeg d'al lec'h ma vez komzet e Kornog Europa, ur goubledenn pe ul fiamm etre keltieg an inizi hag hini an douar bras — an tu da binvidikaat pe da resisaat hon anaoudegezhioù war an hengeltieg. Dre ar munud eo bet studiet ivez evit ar wech kentañ an holl c'herioù a orin galleg ha romaneg, dre ma oa ret en diwezh sellout ouzher ar yezh, skrivet ha komzet, evel ma'z eus bet anezhi, hag evel ma'z eus c'hoazh anezhi. Pep lenner a ouezo hiviziken hag—eh eo gwirion pe diwirion, marw pe vev, faltaziüs pe get, ger-mañ-ger kavet gantañ en ur geriadur bennak.

N'eo ket bet dastumet danvez ar geriadur eta evit ar geltiegourien hepmui, pe evit ar ouizeien oc'h ober war—dro yezhoù Europa. Savet eo bet da gentañ holl evit ar vrezhonegerien a gar o yezh, hag o defe ar c'hoant da vont donoc'h er studi, dre c'houzout petra eo deuet da vezañ bremañ ha petra eo bet en amzer dremenet betek hon amzer-ni.

Embannet e vezo ar geriadur a—rummadoù : pep rummad e vezo ennañ tri levrig (e-tro dek ha pevar—ugent pajenn pep hini). Moullet e vezo daou pe dri rummad bep bloaz, hag e-doug ar c'hwec'h rummad kentañ e vezo embannet roll al levrioù meneget. Ne vezo gwerzhet levrig abet ez distag.

El levrig 1 ez eus : pp. 7*—8*, kentskrid an Ao. Jean GAGNEPAIN, pp. 11*—63*, raks-krid an oberour, pp. 65*—79*, roll an diskleriadurioù diwar-benn an doare da implij ar geriadur, el levrig 2 : pp. 1—2, raklavar an Ao. Léon FLEURIOT, pp. 3—4, an difaziadurioù kentañ, pp. 5—89, 1 A — 124 ACENSI; el levrig 3 : pp. 89—180, 125 ACERBITE — 291. AER.

Pep levrig a zo e ment in—8 bras, mouladur offset war baper 112 g, kaeriet dindan un golo «grandelf» 250 g. gwenn. Priz ar rummad kentañ a zo 90 L (estrenvro 110 L), da gas da Pierre LEROUX, Boîte Postale 574, 2, rue Léonard-de-Vinci, 35007 RENNES CEDEX, KRP 293—68 RENNES. Banque de Bretagne, compte 19—249—13145 RENNES.

Ne vezo degemeret nemet urzhioù-prenañ kaset a-grevret ganto ur chekenn bost pe bank evit ar pae-mant.

Troet ar bajenn mar plij !

DA VEZAN EMBANNET DIZALE :

Christian-J. GUYONVARCH, *Le Catholicon de Jehan Lagadeuc. Dictionnaire breton, latin et français, d'après l'édition de Jehan CORRE, postérieure à 1499, antérieure à 1521, in-folio gothique de la Bibliothèque Nationale (réserve X 946); CELTICUM XIX.*

Anavezet e oa betekhen ar c'hCatholicon dreistholl dre an arroudoù berr hag amglok tennet eus anezhañ gant Émile Ernault en e *Glossaire Moyen-Breton* moulet e 1895. Bez' e oa ahendall un embannadur berraet hag amreizh savet gant Ar Menn e 1867 diwar ar mouladur kentañ graet e 1499. Ar mouladur nevez-mañ a vo graet eta evit adembann testenn Jehan Corre, an hini ma'z eo an niverusañ enni ar frazennoù berr hag ar gerioù brezhoneg.

Savet e vezo ez resis hervez pajennadur ha testenn glok an holl naontek ha pevar-ugent a follennoù a zo el levr, hep kemm ebet en urzh ar gerioù hag e kempennadur al linennoù. Diskoulmet eo bet hepken an holl verradurioù (lizherennoù islinennet). En a-raok eo diskleriet gant ar c'hentskrid pehini eo pouez ha talvoudegezh ar geriadur-se war dachenn ar yezhoniezh keltieg. Diskleriet eo ivez penaos ober gantañ.

Ar c'hCatholicon a zo an diell koshañ e-keñver ar yezhoniezh, o reiñ deomp un alberz eus a stad ar brezhoneg skrivet ha komzet war diwezhadou ar Grennamzer. Bez' ez eo ivez unan eus ar geriadurioù kentañ a zo bet embannet en Europa a-bezh ha ne deo ket a-bouez evit ar gallegourien hepken pe evit ar romane-gourien. Daoust d'ar c'heriaoueg bezañ gallekaet-tre ez eus enni meur a c'her brezhoneg mad hag hi a dleo bezañ lennet ha studiet gant kement brezhoneger dedennet gant amzer dremenet hag amzer-da-zont e yezh. Klôkaat a ra an embannadur-mañ hini an *Dictionnaire étymologique du breton* ha diziouerus e vezo.

Embannet eo da gentañ mouladur Jehan Corre en abeg d'ar c'hementad bras a-walc'h a frazennoù brezhoneg a zo da lenn ennañ. Ar mouladurioù-all a vezo embannet hervez an urzh-mañ da heul :

Mouladur J. Quillevéré	(1521),
Mouladur J. Calvez	(1499),
Dornskrid	(1464).

War o lerc'h e teuy er-maez ul levrenn a *Notennoù* hag a *Addisplegoù*.

N'oa ket bet tu da voulañ an embannadur-se pa'z eo bet lakaet e rakpren e 1971 dre ma oa re zister niver ar rakprenerien paet ganto o skod : daou zen ha tregont en holl, dres an hevelep niver hag hini ar re a baes evit yezhadur an Tad Gregor a Rostren e 1738. Tu a zo avat bremañ da ginnig al labour-se aozet evelhen :

- 216 pajenn; ment : 21 x 29,7;
- testenn kempennet evel hini ar mouladur kent;
- mouladur offset e lizherennoù «Univers» korf 10,
- paper gwenn 100 g,
- golo e «grandelf» gwenn 250 g.

Ar priz a zo 125 L. evit ar re a baes o skod a-raok ar 1añ a viz Mae 1975; da c'houde e vezo 150L da gas da : CCP RENNES 293-68 war anv Pierre LEROUX, Boîte Postale 574, 2, rue Léonard-de-Vinci, 35007 RENNES CEDEX; pe d'ar c'hont 19-249-13145, Banque de Bretagne, RENNES.

Ur mouladur a vezo graet a-ziforc'h, niverennet, war baper 112 g, evit ar rakprenerien gentañ hag o devezo gortozet ken pell-amzer gant kalz a basianted.

Ne vezo kaset skouerenn ebet hep paeamant en a-raok.

